

Abalor (Leon ar Berr) (Erge-Vihan 1874 – Roazon 1946)

Ar Gwir Treh d'ar Gaou. Bet embannet e 1905.

Pez-c'hoari e daou arvest.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Anad eo e ouie Abalor kalz gwelloc'h ar galleg eged ar brezoneg. Stummou galleg a zo e-barz e skrid. Lakaad a ra reiz ar gerioù brezoneg evel m'ema reiz ar gerioù galleg. Da skwer e teu "emgann" da veza gwregel.

Ouspenn ez eus faziou kemmadurioù.

Eur rakskrid e galleg a zo gand L'Estourbeillon.

Eun droidigez e galleg a zo dindan ar skrid brezoneg.

Anad eo e oa "nasionalist" Abalor.

Ar pezh-c'hoari-mañ en-deus bet eur priz e kendalh Gourin (1904)

Gouennelou e oa Abalor, kement hag ar pennad 12 euz 'Reoladurioù ar Skolioù izel' a lavare : "ne vo greet nemed gand ar galleg er skolioù"

Ar hoarierien

Alan koz, perhenn tiegez Kerambeleg, e Langarno.

Aotrou Glen, paotr Pariz, ha mêt Langarno.

Herveig, mevel.

Yann ar Barz, den yaouank euz ar barrez.

Naig, intañvez da Loeiz ar Gall, ha merh Alan.

Marivonig, merh Naig, minorez.

Mona, matez.

Perig, paotr-saout.

Jakez ar Gov, kalvez.

Peizanted.

Daou archer.

E-pad an daou arvest e weler war ar solier c'hoari talbenn eun ti diwar ar mêt gand an arbebeuri hervez ar hiz. En tu dehou d'an oaled, dor kambr al laez.

En ti maner Alan

Da zul vintin

Ar gwir treh d'ar gaou

Arvest I

Kevrenn I

Alan, Herveig

An daou-ze 'zo azezet war eur bank-piltoz, o vutuna gand kern-butun berr. Ar gaoter soubenn a zo war an tan.

Herveig

Neuze, va mestr, e vezo, ne vo ket pell, an eured ?

Alan

M'he tou, dre zant Alan, va faeron, bet debret gand ar helien ! Ne ouian netar war geemnt-se.

Herveig

Me 'grede 'oa eun dra hreet !

Alan

N'eo ket, siwaz ! Annaig he-deus kollet he skiant vad. Koulskoude, ma vije he dimezi torret, ar vez a ruzfe da vad ! Rag, lavaret em-eus da oll dud ar vro, 'oa va merh o vond da zimezi da eun denjentil pinvidig-braz. Roet em-eus dezañ eun nebeudig arhant. Eñ en-deus diskouezet din kalz a deulioù ha paperioù a dalv arhant braz. Deuz ar Gaskogn eo genidig, hag eno en-deus kalz leve. Koulskoude, ma cheñjfe soñj, ha ma trofe kein, koll a rajen va nebeudig skoejou (*outañ e-unan*) a zo skoejou ar vinorez.

Herveig

O restaol a ray deoh ?

Alan

Me 'gred ! Mez eun dra a gav fall-tre ! Or yez vrezonég e laka da zañsal gand ar gounnar. Ouspenn-ze, me 'gav din en-deus lavaret da Annaig, va merh, n'eo ar veleien netra nemed tud fall !

Herveig

War em-eus klevet, eo bet gwechall kloareg, ha bet gwisket gantañ ar zoudanenn.

Alan

Setu ar pezh a lavar an teodou, ha den n'en-deus fiziañs en hini a daol e zoudanenn goude beza he douget. Koulskoude, hemañ a zo eun den mad ! Diluziet en-deus kalz paperioù em-oa e ti an noter, abaoe m'eo deuet er vro-mañ.

Herveig

Ya ! gwir eo kement-se ! hag eun dra vad hoh-eus greet en eur rei dezañ ho plas a vêt. Ha poent 'oa deoh diskuizañ ho spered hag ho korv, goude beza rentet kement a zervijou d'ar vro-mañ !

Alan

(lorh ennañ)

Va Doue ! ya ! tra-walh em-eus-me greet. E-pad kalz bloaveziou on bet mêr ! Eur blijadur vraz eo evidon em hozni, gweled an aotrou-ze em leh en ti-kêr. Gand ar vrasa levenez, hen gwelan ivez o houarn an tiegez-mañ, rag eñ a gar an eler-Brabant, an haderezou Bro-Zaoz, hag an oll binviachou nevez evid al labour e-giz ma lavarar. Lavaret en-deus din, e vezo, en nebeud amzer, greet al labouriou douar hep poan ebed, hag e teuy ar beizanted da veza mistri war ar re all. Mez, evid an dra-ze, eo red deom lakaad ar veleien da devel !

Herveig

Mad-tre ! An aotrou Glen a zo eun den desket-braz, hag eun enor e vije deoh kaoud eur mab-kaer eveltañ.

Alan

Eun dra e vije, sur ! Koulskoude, eun dra ne gavan ket mad en e gomzou. Diodh ma lavar, an douar a vezo mad an oll dud asamblez ? Petra an dra-ze ?

Herveig

An dud desket-se, a lavar bepred traou spontuz evel-se. Ma timezit ho merh gantañ, c'hwi 'vezo dizammet deuz ar garg da gemered soursi deuz madou Naig hag ar vinorez !

Alan

Ya 'vad ! Kalz a vadou he-deus ar vinorez, ha n'hellan ket ober an dilez gand va merh, a-raog he dimezi, rag ar merhed o-deus nebeud a benn evid ren eun tiegez. Me 'lavaro eun dra dit goustadig, mez na lavar netra da zen all !

Herveig

Ra zeuin da veza mud evel eur pesk m'her lavarfen !

Alan

Ne gav ket dit, Herveig, eo troet spered va merh abaoe ma'z eo intañvez, ha kollet ganti Loeiz ar Gall ? Doue r'e bardono ! Pa oa beo, ne oa ket karet meurbed ganti ! Bremañ, keuz he-deus d'he fried.

Herveig

Lavarit gelloh e klemm Naig, gand ar zoñj euz Yann ar Barz, an hini he-doa karet da genta.

Alan

Klevet am-eus anezi o lavared da Haid, leanez Lespervez, e oa eur holl evid ar vro, kas an dud yaouank da ober o amzer-zoudard en Afrik !

Herveig

Kalz tud a Vreiz 'zo maro pell diodh o bro, en eur zivenn Bro-Hall, war zouar ha war vor, en amzer ar Rouaned, Napoleon goz hag ar Republik ivez. Ar re-ze a vije bet tadou a famill, ha pennou tiegez-mad !

Alan

Just evel Yann ar Barz. Hemañ 'oa pinvidig-braz ha desket evid gouzoud skriva ha lenn en peb levr. Petra bennag ma oa gouiziet, e kare komz brezoneg gand tud diwar ar mêz. Eur mestr 'oa evid sevel gwerziou, hag o hana er festou-noz hag en eurejou. Naig ha Yann en em gave an eil egile, evel diou durzunell. Mez hirio, ar brezel kriz en-deus lazet Yann ar Barz, ha va merh a zo en he soñj atao ennañ, abaoe m'eo maro Loeiz ar Gall. A-hed an devez hi a gan soniou a garantez, savet gwechall gand Yann ar Barz !

Herveig

Hag hirio zo bet ganto¹ da zimezi an eil d'egile ?

Alan

Ano 'zo bet ! Mez hemañ n'eo ket bet gwelet abaoe, ha koulskoude poent eo da Naig dimezi a-nevez.

Herveig

Rezon hoh-eus da lavared kement-se, Alan ! An aotrou Glen a vezo eur gwaz mad eviti. Hemañ 'zo eun den ! Abaoe ma'z eo kuzulier jeneral, ar gouarnamant a ro din bep bloaz eur skoed evid ar remm am-eus tapet e Conlie, e-pad ar brezel braz.

Alan

Ya 'vad ! Naig a vezo dimezet adarre ! Ha bremañ, me a lavaro dit ar pezh am-eus greet, gand aon na deufe Naig da vza eur zodenn glock, ha na gasfe oll danvez ar vinourezig da netra em goude-me ! Ranket mad eo bet pep tra ganin ha gand an aotrou Glen, hag hemañ 'zo bremañ gward d'ar vinorez, hag a vezo ivez he gward goude va maro, pe e timezo Naig, pe ne ray ket !

Herveig

E pe hiz hoh-eus greet ?

Alan

Glen en-deus en em glevet gand eur barner a anaveze mad, evid ober eur paper. Naig a zo bet galvet dirag ar barner-ze, hag he-deus sinet he-unan (heb gouzoud dezi petra 'oa) ar paper war an hini² 'oa merket eo eun intañvez sod. Ar setañs, 'oa douget deh, ha pa vezo roet da anaoud, ni a halvo ar hoñseill famill dirag ar barner a beoh. Lavared a rin ne fell ket din beza gward d'ar vinorez hag e vezo choazet Glen em flas. Mez setu-eñ amañ o tond.

Kevrenn II

Ar heveleb re.

Glen (*eul levitenn, hag eun tok kern-uhel gantañ*)

Glen

Levenez ha yhed deoh ! Setu-me distro adarre deuz kêr. Ar varnedigez a zo skrivet evel m'ho-poa lavaret. Bremañ, Lanig koz, bezit dineh ! Ho tanvez ne vezo ket gwall zispignet gand ar verh-se, mar degouezfe deoh mervel. Ar pedennou o-deus lakaet anezi da veza sod, a gav din. N'on ket evid mired da zoñjal eo follet-mik ! Setu amañ ar skrijou euz ar varn.

¹ zo bet ganto : tregrieg.

² an hini : behini, er skrid orin.

Lakaad a ran anezo e-barz ma leorig paper, asamblez gand ar roll dornajou arhant prestet din ganeoh. Perag ne fell ket dezi dimezi da eur bourhiz mad eveldon ? N'on ket eur gwall den 'mechañs ? An oll a oar kement-se ?

Herveig

Evid gwir n'oh ket rok tamm ebed !

Alan

Kalz rustoh 'oa Loeiz ar Gall. Doue hen bardono ! Meur a wech e tisprize an dud, evel ma vije unan euz an noblañs !

Glen

Ni a zo greet evel-se, ni ne gollom ket on amzer en iliz ! Ha karoud a reom ar bobl ha dreist-oll ar bobl diwar ar mêz. Tud ar vro-mañ a zo eun druez gweled anezo. Mond a reont d'an overenn. I a gred êz sotoniou ar relijion ! Ar wazed a zo spontet gand ar gwrazez pennfollet gand ar veleien. Ar vugaligou a zesk er hatekiz dond da veza tud panezenneg. Ar vro 'zo leun a veneh hag a leanezed. Skozellet ganeoh, Alan goz, me a cheñcho penn d'ar vaz !

Alan

(gand lentegez)

Mar hoh-eus c'hoant e teufe d'ho karoud, aotrou Glen, en gwirionez ne dlefeh ket lavared dezi traou fall diwar-benn ar relijion.

Glen

Daonet 'vo va ene ! Ne greden ket e oah tamm bigod !

Alan

N'on ket 'vad ! Bremañ eh on unan deuz ar re na vezont gwelet nepred war-dro an iliz, evel ma vezen gwechall. Diskouez a ran ez on eur gwaz pa'z eo gwir eo sonet eil son an overenn-bred, hag e choman amañ memestra !

Glen

Ya ! C'hwi a zo eur gwaz ! Hogen, lezel a rit Naig da vond d'an iliz gand he flahig ?

Alan

Me am-eus lavaret dezo chom amañ, ivez, heb mond d'an iliz. Naig he-deus respontet e oa hi ar vestrez e Kerbeleg.

Glen

(hemañ a wel eur hatekiz brezoneg war an daol)

Ouspenn an aotre hoh-eus roet dezo da vond d'an overenn, c'hwi a gav mad e ve desket ar hatekiz da vugale gand sikour ar brezoneg louz-se ?

Herveig

En gwirionez, aotrou ! bete vremañ ar galleg ne veze ket komzet kalz e Kerbeleg. Evidon me n'ouzon ket gallegad. Me a zo re goz bremañ ! Ha me a lavar deoh n'em-eus morse komprenet evid petra e fell deoh diskar on yez ?

Glen

Me 'zisplego an dra-ze deoh diwezatoh ! (*outañ e-unan*). Pebez genaoueg !

Kevrenn III

An heveleb re. Annaig. Marivonig

(*ar vamm hag he merh gwisket gand o gwsikamañchou kaerra*)

Glen

Demad, itron ! Dudi ha levez deoh ! Eüruz on en eur weled ahanoh. C'hwi a ya e kêr, heb mar ebed ?

Naig

Da gêr ned in ket ! d'an overenn-bred, ne lavaran ket.

Glen

Petra ? gand an amzer gaer-mañ, goude beza poaniet e-pad ar zizun, c'hwi a ya d'an iliz e-leh mond da ober eur bale ?

Naig

Ni a yelo en abardaez-mañ beteg ti an aotrou Sant Kadog benniget, pa'z eo gwir ema e bardon hirio !

Glen

Mêr on er barrez, ha dre va urz, ar japel a vezo serret. A-walh an iliz vraz d'an aotrou Person ! Ma vez digoret ar japel, ar person flamm-mañ a vezo diskuillet ganin d'ar barner !

Naig

An aotrou person ne vezo ket e-unan e Sant-Kadog, mez c'hwi a gavo eno gourenerien da stourm ouzh, ha n'o-deus ket aon ebed rag chas kounnaret Bro-Hall !

Glen

Ha c'hwi 'gred, Yann, e kredfent terri va gourhemenn ?

Alan

Ya, me a gred !

Glen

(*drouglivet da Alan*)

C'hwi a yelo da lavared d'ar re-ze eo red dezo heuilla al lezenn !

Alan

(*nehet*)

Me a yelo, va Doue ! Petra levez-te war gement-se, Herveig ?

Herveig

(*nehetoh c'hoaz dre m'he-doa roet Naig eun taol lagad dezañ*).

Netra ! Netra !

Naig

(war he daoulin dirag he zad)

Nann, va zad ! c'hwi ne yefot ket, me ho ped ! *(sevel a ra)*. Ha te, Herveig koz, goul digantañ ha muioh e kar eur hloareg difroket eged e verh ?

Herveig

O nann ! Muioh e kar e verh !

Alan

Setu amañ eun dra marteze, hag a vezo êz da ober : Aotrou Glen, list dor ar japel digor ar wech-mañ ?

Glen

Foultr ! Dor a vezo serret da genta ! Goude-ze, pa vo an dud sentet ouzin, me a welo ha digori a hellin ar japel.

Naig

Na gredit ket anezañ ! Pa vo serret an nor, e vezo serret evid atao. An hini difroket³ a lavar gevier deoh.

Glen

C'hwi a gan kaer-meurbed, va dousig !

Naig

N'on ket ho tra, nag ho tousig, aotrou !

Glen

Anad eo ne garit ket ahanon, pa zougit war ho piz eur walenn erminig, ha roet deoh gand Yann ar Barz. Koulskoude, bez' e tleit da genta ober bolontez ho tad ! Sentit outañ, hag e roin deoh eur walenn aour.

Naig

Hiviziken, gwalenn mui war va biz, nemed an hini roet din gand Yann ar Barz. Gwell eo din-me senti oh Doue eged oh an dud !

Glen

Doue ne zivenn ket ouzoh deski ar gizioù nevez !

Naig

Kerz da lavared an traou-ze d'ar re o-deus amzer da goll !

Glen

An diaoul o zammo war e gerniel ! Foultr Doue. Eun deiz me ho plego evel ar re all !

Alan hag Herveig

(o-daou)

O ! O !

³ An hini difroket : an difroket, er skrid orin.

Glen

(dezo)

Me a lavare eo mad d'an oll kaoud furnez evelдох-c'hwi.

Alan hag Herveig

(o-daou)

A !

Naig

Ha kredi a rit-hu, aotrou Glen, va lakaad da blega, abalamour ma faour-kêz tad bet eet atao da heuill ar vourhizien villiget, hag abalamour Herveig koz a gred eo dre ho kalloud en-deus bet eun tamm leve a skoejou, digand ar houarnamant. C'hwi a gred ez on eur verh dinerz, hag e rin evel m'ho-po c'hoant ? Fazia a rit !

Glen

Me 'gavo an tu da lakaad ahanoh da zoubla !

Naig

Doue r'on diwall oll dioh an droug !

Glen

'Vid ober plijadur d'ho tad, da vihanna, list ar plahig amañ, hag it hoh-unan d'an iliz. Lavared a heller e gwirionez eo mad ar relijion evid ar merhed koz ! Ya 'vad ! n'eo ket fall-tre evito !

Naig

Doue en-deus greet ar rilijion ken evid ar merhed yaouank, ken evid ar merhed koz, hag ar wazed ! (*da Varivonig*) : Marivonig, va merh, ha ne fell ket dit chom amañ, e-pad an overenn-bred ?

Marivonig

Me a yelo ganeoh, va mamm ! Piou a viro ouzin da veza eur gristenez vad, evel va zadou-koz ? Goud' an Aotrou Doue, c'hwi eo va muia-garet war an douar-mañ !

Glen

Homañ a zo kelennet en eur feson fall-meurbed ! Setu amañ eur plahig na oar ger galleg ebed !

Naig

Abred a-walh e ouezo honnez komz galleg, ha kalz gwelloh evidoh-c'hwi. Eun devez bennag, hi a zerro deoh ho peg. Mez n'em-eus ket amzer da ziviz. Kleved a ran ar hleier o son ar zon diweza evid an overenn-bred. Dond a rit, tad ? Evidout, Herveig, te a jomo amañ peogwir out bet en overenn vintin. Reio a ri boued d'al loened, lakaad a ri ar haol hag ar rutabaga er zoubenn war-dro unneg eur. War an daol zo eur zahadig fars mañch⁴, a dle beza taolet er gaoter...

Herveig

Me n'on ket bet en overenn-veure !

⁴ fars mañch : farz ed-du.

Naig

Na lavar ket gevier, ha na nah ket da Zoue, dirag eur hloareg difroket. (*Mond a ra d'ar zoubenn*).

Glen

(*outañ e-unan*)

Daoust d'he oll dismegañsou, an traou a vezo din : he he-unan, he ziegez, he loened, hag he flahig !

Naig

Herveig koz, te a zo bet en overnn-vintin, ha mad e-teus greet. (*Herveig a stou e benn*).

Glen

Pebez anduillenn eo an tann-mañ !

Naig

Ha c'hwi, va zad, deuit eta ! Deom ! arabad eo deoh kaoud aon, ne vez greet goap ahanoh gand lakizien Bariz. Daoust ha ne gavit ket gwell dond d'an iliz eged chom amañ da hallegad gand unan hag a ra fae warnoh abalamour d'ho prezoned, yez santel ho tadou-koz ? Alo, deuit !

Alan

(*o vousec'hoarzin etre c'hwek ha c'hwero*)

Evid kaoud ar peoh, hag evid eur wech, me a yelo neuze !
(*Mond a reont kuit oll, nemed Glen, souezet ha kroazet e zivreh gantañ*).

Kevrenn IV

Glen

(*e-unan*)

Setu 'ta galloud ar merhed, e-barz an tiegez ! Diskar ar galloud-se a rankan-me en tiegez-mañ, ha me 'gavo an tu evid kement-se ! Biken Naig ne vo va fried, an dra 'zo sur ! Hogen ar vinorez 'zo dindan va dorn. Eun dra vraz, gounezet eo ! An tiegez gallouduz-mañ a zo red din-me da gaoud, evid trei ar gizioù er vro, rag a beb amzer, ezeh an ti-mañ a zo bet rouaned er barrez. Setu ar pezh a rin : pa'z eo eun diêzant evidon an tad-koz, pa n'ouzon ket e pe tu e troio, me raio dezañ mervel, asamblez gand e verh, ha diwezatoh, me 'zimezo d'ar plahig yaouank, pa vezo deuet en oad. Evel-se 'vo gwelet piou a vezo ar mestr amañ ! A ! bandenn moh Bretoned, c'hwi hoh-eus kavet ho kabestr ! Hini ahanoh ne hello va zamall da veza eur muntre, rag an den tamallet 'vezo Herveig, a zo tiwall ar zoubenn. Ar varnerien a raio hervez va flijadur ! Me 'zo eur mestr evito. Ar gaoter a vo kaoz deuz maro ar vistri, ha kondaonedigez ar mevel ! A ! A ! A !

(*Glen a ya kuit dre an tu dehou*)

Kevrenn V

Yann ar Barz

(*e-unan o tond dre an tu kleiz*)

(*Hemañ a zo kuzet dre ar stalaf, hag a gan an diskan deuz "An Heizez Kollet", gand Taldir*)

O ! pegoulz returni-te
Oh hirvoudi gand enkrez

Kollet am-eus gwasoh ‘vid aour
Kollet am-eus va heizez⁵.

(Dond a ra e-barz. Hemañ a zo gwisket e zouav)

Doue d’ho pennigo, tud an ti-mañ ! Eurvad ha plijadur deoh... An dud a zo eet oll d’an overenn-bred. Koulskoude p’emañ ar gaoter war an tan, e kredan zo eun den bennag chomet er gêr, hag e teuio ! Setu amañ ti Naig ! Daouzeg vloaz ‘zo on eet kuit. An amzer zo bet hir-meurbed. Anna ‘oa o ren he daouzeg vloaz pa oan eet d’ar brezel en Alger. Greet prizonier gand an Arabed, ne hellen distrei d’ar gêr. *(Diskouez a ra an oaled)*. Setu amañ bank an oaled e-leh ma’h azezen e-pad an nozveziou, evid displega koñchennou, asamblez gand Alan goz hag Herveig. A-wechou e sellen a-dreuz sklêrijenn ar goulou, ouz va dousig Naig o kribina gloan deñved. Setu amañ an daol vraz a famill, gand ar bara e penn an neh. Madelez Doue ganin ! Setu e-barz al listrier, parailler va loaig veuz, rag pedet e vezen aliez da dañva ar zoubenn. Allaz ! hirio an dud a Vreiz-Izel a gred ez on maro ! Setu an orolaj a zonas an eur da vond kuit. Setu amañ ar momeder a lavare dre e dik-dak, ‘oa tremenet an amzer, hag a lavar hirio, eo tremenet an amzer a garantez ha ne zistroio mui. Pegen liez gwech, azezet dindan an dinell en dezerz braz, em-eus huanadet en eur zevel eur zon glemmuz, rag ar gaerra garantez en em goll en êr, evel an ezañs, pa rank an daou vignon, pellaad an eil dioh egile. En eur zoñjal d’ar garantez, ne bad ket pell amzer eo em-eus savet son “*An heizez kollet...*“ Eur bugelig paour, kollet en-deus e heizez. 'Mechañs, ganet e oan dindan ar memez planedenn. Ha koulskoude e kanin, evid frealzi va halon.

(Kana a ra).

⁵ va heizez : selled ouz an notennou-muzik, eun tammig pelloh.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

An heizez kollet⁶

Me 'zo eur bugel heb chañs !
Ar gwiniz gwenn 'm-eus mezet...
Mez unan all gand an drougrañs
Siwaz ! en-deus hen medet !

Diskan

Me 'zo eru paotr fall-eüruz
Kalet eo va flanedenn !
Ha va spered anoazuz
Ne agv ket nemed anken.

Me 'garje boud an avel
'Vid redeg ar vro dre-oll,

⁶ An heizez kollet : Gand aotre Taldir

Da adkavoud an Durzunell
A zo 'vidon-me war goll.

Mez biken ne welin
Va heizez ken war ar bed.
An avel braz a lavar din
Siwaz, e' 'r baourig marvet !

(Kemer a ra war an daol eun davanherig vihan).

Va Doue ! Gweled a ran eo dimezet Anna, rag amañ e welan dillad eur plahig vihan. Biken ne vevim dindan ar memez toenn. Biken on diou galon ne vezint stardet, gand liamm ar Briadelez, na hell torri, nemed ar Maro ! Pell amzer zo, hi he-deus dilezet ar walenn erminig roet ganin dezi. Me 'garfe ne vijen morse distroet da Vreiz-Izel ! Va Doue ! Va Doue ! nikun deuz ar vro-mañ ne hell kuitaad aotchou, parkeier trempet gand ludu on tadou-koz, heb ma rann e galon en e greiz. Dond a ran en-dro, ha ne gavan mui netra deuz ar pez a welen gwechall ! Gand piou eo dimezet Annig ? 'Mechañs, gand Loeiz ar Gall ! Plijet gand Doue, m'en-devezo he rentet eüruz (*eun den a glever o vale el leur*). Mez setu amañ unan bennag o tond. Marteze ne anavez ket ahanon, ha kredi a raio ez on eul laer ! (*Selled a ra dre ar stalaf*). O ! O ! Na kaerra pabor ! Eun aotrou eo ! Gantañ war e benn, eun tok roue uhel, ha war e gein eul levitenn. Selled a ra a bep tu, evel ma soñjfe ober eun torfed ! Me 'zo 'vond da guzed ! (*Eñ a ya e kambr al laez*).

Kevrenn VI

Glen

(e-unan, e sell tro war dro, kepit 'n e zorn).

Gwell aze. N'eus den en ti ! Degouezet 'on en eur mare mad ! Aon em-boia ma vije amañ Herveig koz, an anduillenn-ze. Lavaret em-bije e tegasen dezañ rutabaga ! Mez hennez a zo ken diod ! Erfin, hastom ! Tud an ti-mañ n'int ket evel Sokratez ar Greg. Mar goufent peseurt soubenn a verv er pod-houarn, ne fellfe ket dezo tañva anezi. (*Tenn a ra e gontell deuz e hodell, hag e troh ar hegid en eur zelled a-wechou ouz an nor*). Aon em-eus na zeufe en-dro Herveig... Nikun deuz pemp piz ar hegid ne ziskuillfe ahanon d'ar justis ! Mez groñs e tiskuillfent ar mevel. Ayou ! trohet eo va biz ganin ! (*Lakaad a ra e gontell war an daol*). Peleh e taolin ar rutabaga ? Er gaoter pe er bodez a zo amañ war ar mên oaled ! Eun tammig enne o-diou ! (*mond a ra d'an oaled*). Pemp biz er bodez en enor d'ar justis, eur pemp biz all er gaoter, en enor d'ar studiou diwar-benn Athens. Ar mevel sod-mañ a vezo kastizet gand gwir abeg, peogwir en-devezo lakaet e-unan ar rutabaga er gaoter ! Foultr Doue ! va biz a goll e wad ! Va mouchouer en-dro dezañ ! Mad-tre ! Hastom buan ! (*Lakaad a ra eun nebeud keuneud en tan*). Piou a gredo eo aotrou meur Langarno en-doa lazet an hini a oa e karg kent evitañ, hag intañvez Loeiz ar Gall gand ar poezon-mañ ? Ne vezo difiziañs ebed warnañ. Piou a ziwallo ar zoubenn ? Herveig c'hoaz. Me 'lakaio en e spered mond da gas ar plahig da di Gaid Lesbervez ! Evel-se eñ a vezo tamallet, abalamour ma vezo chomet amañ, e-pad an overenn-bred, hag abalamour ma vo eet d'ar vourh da greisteiz ! Evdion-me am-eus louzou a-eneb ar poezon, ha ne vezin nemed eun tammig klañv ! Rag-se setu eun dra hreet ! Goude maro an oll, me 'vezo gward da Varivonig, ha Kerambeleg a vo din !

(Mond a ra d'ar gaoter, evid renka an tan eur wech all, ha goude e ya kuit en eur lavared) : Poaz ! Poaz ! soubenn ar veerd !

Kevrenn VII

Yann ar Barz

(e-unan. En em ziskouez a ra nebeud ha nebeud)

Setu aze petra a vije c'hoarvezet gand ar famill gêz-mañ, ma n'en-dije an aotrou Doue va degaset amañ ! Piou eo Marivonig ? Hemañ a lavar e vo e virour. Mez me am-eus soñj mad, n'en-deus ket komzet diwar-benn aotrou mêt Langarno, na diwar-benn Naig e verh, intañvez da Loeiz ar Gall ? Pebez traou spontuz a zo diskuillet din, en eur pennadig amzer ! *(en eur zoñjal)*. Petra a rankan-me da ober *(mond a ra d'an oaled)*. Diskar ar gaoter-mañ raktal, ha teuler er-mêz an irvinou faoz-se. *(Dond a ra en-dro, heb lakaad e zorn war ar gaoter)*. Daoust hag eñ n'en-deus ket lavaret eo mêt e Langarno e plas Alan. Henez a zo eun den gallouduz marteze ! hag ar varnerien ne raint netra en e eneb, war lavar eur paour-kêz soudard evel don.. *(Selled a ra ouz ar gontell 'zo war an daol)*. O ! O ! den n'en-deus distrujet e gontell ! Kemerom atao, hag e lakin anezañ d'en em ziskuilla e-unan ! Eur zouav Afrik ne vez ket tapet berr. Deom, ni on-daou, aotrou mêt nevez Langarno ! C'hwi 'fell deoh kas tud didamall d'ar gwillotin : ni a welo ! *(Bale eun den a glever)*. Eun den all c'hoaz ! A ! Herveig eo ! *(Herveig a zeu e-barz, ha Yann a lavar outañ e-unan)* : Setu eur hamarad hag a fell din mired outañ da dañva ar zoubenn.

Kevrenn VIII

Herveig ha Yann

Yann

Demad, Herveig koz !

Herveig
(soutez)

Piou oh ?

Yann

Piou on-me ? ha 'teus ket dalhet soñj euz eun den yaouank a guitaas gwechall ar barrez-mañ, evid ober e amzer-zoudard en Afrik ?

Herveig

Soñj ebed, nemed deuz Yann ar Barz, hag a zo maro !

Yann

Maro ! Piou a reas seurt kelou dit ? Beo-buhezeg eo, ha setu-eñ amañ, rag me va-unan eo !

Herveig

C'hwi eo Yann ! *(gand disfiziañs)*. Yann ne oa ket eur barveg evel doh ha pell zo eo maro er brezel.

Yann

Ha c'hoant e-teus da weled ar gleizenn chomet em breh war-lerh ar bloñs greet gwechall gand da freill ?

Herveig

Ya, diskouez !

Yann

(en eur droñsa e vañch)

Sell ‘ta, tonton !

Herveig

Ha n’oh ket maro ‘ta ?

Yann

P’am gwelit amañ ! D’an noz goude an emgann braz, an Arabed o-deus dastumet ahanon war dachenn ar stourm, hag abaoe an amzer-ze e oan prizonier.

Herveig

E gwirionez ya ! n’halleh ket beza maro, peogwir ho mortuaj ne oa ket degaset d’an ti-kêr.

Yann

(o c’hoarzin)

Pa gomzom diwar-benn an ti-kêr, lirit din-me, ha mêr eo atao Alan ?

Herveig

N’eo ket ‘vad ! Kredi a ree ‘oa re goz. Roet en-deus e blas d’eun aotrou euz a Bariz, hag en-deus eur maner er vourh.

Yann

Peseurt ano en-deus an aotrou-ze ?

Herveig

(Eñ a gemer eul loa el listrier hag a ya ‘trezeg an oaled evid tenna an eon diwar ar zoubenn).

An aotrou Glen a vez greet anezañ !

(Kas a ra e loa d’ar gaoter evid tañva ar zoubenn).

Yann

(skei a ra war ar mevel, hag ar zoubenn a gouez deuz al loa).

A ! Glen eo anvet ?

Herveig

Jezuz ! Va dillad ar re gaerra. Bremañ e lakin ar rutabaga, an irvinou, ar haol hag ar farz-mañch er gaoter.

Yann

(outañ e-unan)

Mired a rin outañ da dañva ar zoubenn ? Chom a rin dalhmad en e gichenn. *(Da Herveig)* : E lakin da boan⁷, da aoza mern ?

Herveig

Daoust ha c’hwi a jomo da zebri ho mern ganeom ?

⁷ E lakin da boan : e rin en da blas.

Yann

Me 'gred e vezin pedet gand Yann ! Penaoz ema ar bed gantañ ?

Herveig

Eñ a zo seder a-walh ! Naig, Marivonig vihan he me, yah om oll amañ. M'ho trugareka. Eet int oll d'an overenn-bred. Echuët am-eus da rei boued d'al loened hag e hellom komz bremañ eun tammig ken a zeuint deuz ar vourh.

Yann

Mad-tre ! Kalz a geleier mad 'teus da rei din. Alo ! Lakit eur hornad butun.

(Azeza a reont war ar bank-tosell hag e savaront en eur vogedi butun).

Herveig

Ya ! Eur helou bennag am-eus da gonta !

Yann

Petra eo deuet Loeiz ar Gall da veza ? Gwechall ni on-daou a ree al lez d'Annaig.

Herveig

Ma Yann goz, c'hwi a houlenñ eur helou bennag deuz Annaig ? N'em-eus nemed kelou fall da rei deoh diwar he fenn !

Yann

(dienez)

M'her goar mad !

Herveig

Gouzoud a rit eo dimezet Annaig ?

Yann

N'ouzon ket ! N'ouzon ket !

Herveig

Lavaret hoh-eus : « M'her goar ! »

Yann

N'em-eus lavaret netra ma houfen !

Herveig

Naig a rankas dimezi da Loeiz ar Gall, eur gwall den. Hogen hemañ a zo maro goude pevar bloaz briadelez.

Yann

Paour-kêz Naig ! Hi a zo intañvez ha n'eo ket c'hoaz tregont vloaz !

Herveig

Ya ! intañvez eo hag eur plahig vihan seiz vloaz chomet ganti. An aotrou Glen a zo mirour eviti.

Yann

Ar mirour ! (*outañ e-unan*). Petra ‘fell d’an den-ze lavared ? (*da Herveig*). Penaoz ar vinorez n’eo ket bet fiziet er vamm e en tad-koz ?

Herveig

(*nehet*)

Va Doue, nann ! Hi he-deus bet ar vinorez da genta, mez tennet eo bremañ diganti.

Yann

Piou en-deus he zennet ?

Herveig

Ar varnerien o-deus lavaret ne oa ket fur a-walh !

Yann

Daoust ha diskiant eo ?

Herveig

N’eo ket tre ! Mez re droet gand ar relijion, hervez ma lavar an aotrou Glen.

Yann

Te a gred ez eo gwir se ?

Herveig

N’on ket evdi komprenn an dra-ze. (*ha c’hoant gantañ da zistrei ar gont*). N’hoh-eus ket gwelet ho mamm ?

Yann

Nann evid c’hoaz ! Laret zo bet din e gar an hent-houarn, er beure-mañ, ‘oa eet va mamm da Vrest, hag e tle distrei en abardaez-mañ. Te ‘oar euz a beleh e teu an aotrou Glen-ze ?

Herveig

Euz a Vaskoni, a lavar. Eñ a fell dezañ kaoud eur verouri er vro-mañ hag e klask eur plas bennag da brena. Eun den desket meurbed eo, ha kalz a draou a anavez. Setu eno eun den ! hag e-pad ma vo beo, hini euz ar re o-deus gouarnet gwechall ne houarnint biken ! Me ‘gomz deuz an noblañs hag ar veleien !

Yann

O ! O ! Daoust hag-eñ ne gar ket ar veleien ?

Herveig

N’o har ket, foultr ! Eñ a fell dezañ divenn ober pardon an aotrou Sant Kadog benniget ! Mez ar pezh a ra e wasa afer, eo, ne fell ket dezañ e ve komzet brezoneg. Me n’ouzo ket komz ar galleg. Ne ran forz ebed euz ar veleien, mez mose ne droin kein d’ar brezoneg !

Yann

‘Teus ket soñj deuz eul lavar koz : “Ar yez hag ar Feiz a zo Breur ha C’hoar e Breiz“ ?

Herveig

Naig a lavar se ! Ar pezh ‘zo kaoz ne gemero morse Glen da bried.

Yann

Daoust ha c'hoant en-deus al labous-mañ da zimezi ganti ?

Herveig

Ya da ! ha c'hoant Alan eo ivez ! Hogen an den ne blij ket dezi, rag hi, on sur, a zo atao he soñj ennoh !

Yann

(gand esperañs)

N'eo ket kollet pep tra ! *(da Hervéig)*. Me a gred e ve gwell deom mond er-mêz da fumi, rag re domm eo amañ.

Herveig

Mar kirit e tiskouezin deoh eun ebeulez daou vloaz ? Gortozit eun tammig ma tañvain ar zoubenn.

Yann

(buan)

Na dañvait ket ! Na dañvait ket ! *(sioul)*. En Afrik, ar jeneral a zivenne ouzom tañva ar zoubenn.

Herveig

(soutez)

Ha gwir eo an dra-ze ?

Yann

(o kas anezañ goustadig war-zu an nor).

N'eo ket mad meska ar zoubenn, evid diwall dioh ar preñved-kleñvijenn hervez ar medisin major.

Herveig

(gand eur souez brasoh)

Daoust ha c'hwi 'zo bet tabouliner-major ?

Yann

Ya ! e rujumant ar Benn-Boull-Tou-Chour !
(Mond a ra kuit).

Al lein a ziskenn
Diwez an arvest kenta

Eil arvest

Kevrenn I

Glen, Herveig

(a zegouez war ar zolier a hoari).

Glen

Neuze e-teus laavret dezañ piou on-me ?

Herveig

Kleo ! peogwir e houlenne hoh ano !

Glen

N'en-deus goulennet diganez netra all ken ?

Herveig

(en eur deuler koad en tan).

Nann ! A ! eo... Lavaret em-eus ivez dezañ, ma 'm-eus soñj mad, ne fell ket da Annaig rei deoh he dorn !

Glen

Kement-se e-teus lavaret ?

Herveig

Ha greet am-eus fall ? Red eo rei da anaoud d'an den-ze n'en-deus netra ken da ober amañ, nemed mond er-mêz euz an ti, hag eo cheñchet amañ kement tra 'oa diagent !

Glen

An oll draou 'zo cheñchet ! Te a gred ?

Herveig

(en em lakaad a ra da dañva ar zoubenn).

Petra livirit 'ta ? Daoust ha n'eo ket cheñchet an traou penegwir oh amañ ?

Glen

Na gemmesk ket ar zoubenn er giz-se ! Morse n'am-eus gwelet tud louz evel ar re-ze da veska ar zoubenn !

Herveig

Devet 'o va horn !⁸ Daoust hag eur hiz nevez a zo deuet amañ ? Daoust ha c'hwi 'zo bet ivez en Afrik ?

Glen

Me ! an Afrik. Abalamour da betra ?

⁸ Devet 'o va horn ! : estlamadenn.

Herveig

Peogwir ne fell ket deoh gweled an dud o tañva ar zoubenn. Koulskoude n'em-eus morse a-raog hirio klevet ganeoh meneg deuz preñved-kleñvijou ar medisin-major ?

Glen

Chantr Godelleg !⁹ Ha koll a rez da benn ? Piou en-deus komzet dit deuz ar preñved-se ?

Herveig

Ar zouav ! Kerniel an diaoul !

Glen

Kontet en-deus dit eur zahad koñchennou diod, ar zoudard-se ! Mez war-dro ped eur eo degouezet amañ ?

Herveig

E gwirionez ! En em gavet eo, eun nebeud goude ma oa eet an dud all d'ar vourh. Her havet am-eus en ti, pa on distroet, goude beza roet o boued d'an anevaled. Lavaret en-deus din e teue deuz gar Langarno.

(Herveig a ya hag a deu dre an ti. Kemer a ra eur morzol, evid tacha e voutou).

Glen

(outañ e-unan).

Foultr Doue ! An taol 'zo bet tost dezañ chom heb beza greet *(en eur skei gand e zorn war e dal)*. Kavet am-eus eun dra ! E-leh lakaad ar beh war chouk ar genaoueg-se, me ray tamall ar zoudard. Mez Yann ne dle ket pedi anezañ da gemered soubenn. *(en eur zoñjal)*. Me 'gaso ar zoudard er-mêz : evel-se e vo lavaret eo eñ en-deus greet an torfed, droug ennañ, abalamour 'oa Naig o vond da zimezi da eun all. Sklêr eo ar pezh am-eus da ober. *(selled a ra dre an nor)*. Setu-eñ o tond deuz ar hraou-zaout. An Afrikaned-se o-deus pennou tomm ! Eur zikan bennag a zavo etrezom, hag eñ a ranko tehed !

Herveig

('lez e labour a-gostez)

Perag eo ho penn ken teñval hirio ? Daoust ha gwarizi ho-peus, aotrou, ouz ar zouav ?

Glen

Me ! kaoud gwarizi ! Ar zantimant-se ne hell ket beza e kalonou an dud deuz va renk-me ! Ne galskan nemed eun dra, ha va gwad a skuillfen evid kement-se : labourad da renta an oll dud eüruz war an douar !

Herveig

Daoust hag an dra-ze a dalv muih eged gouarnamant Bro-Hall ?

Glen

Setu eur goulenn ha n'e-pije ket greet ma vijes bet er skol ! Eun devez, tud diwar ar mêz, pa vezo sklêrijennet o sperejou gand ar skiant-vraz, c'hwi a gompreno pegen kaer eo an Unvaniez a ren etre an oll dud deuz an douar dre ar "socialisme". Mez lezom an afer-ze a-gostez evid bremañ ! Ha mond a ri a-benn kreisteiz da weled Gaid Lespervez ?

⁹ Chantr Godelleg ! :estlamadenn.

Herveig

Ya ! mond a rin ! (*selled a ra oh Glen gand eun êr souezet*). Mez, aotrou Glen, penaoz eh ouzoh-hu e tlean mond di da galsk va mern ?

Glen

Anaoud a ran oll gizioù ar barrez-mañ, ha gouzoud a ran eo boaz Gaid da rei eur pred krampouez gwiniz d'an oll mevelien ha mitizien euz he oad da zeiz pardon Sant Kadog.

Herveig

Gwir eo !

Glen

Mond a ri da-unan ?

Herveig

Ya ! Hag en em lakaad a rin en hent, pa vezo ar re all distro deuz ar vourh !

Glen

Ne gemeri den ganez ?

Herveig

Nann ! Mon goz a rank chom amañ, evid farda he dillad da Varivonig a zo anvet da zougen rubanou banniel santez Anna.

Glen

Mez te 'hell kas Marivonig ganez ?

Herveig

Me 'blij kement-se din, mez ar vamm, na Marivonig, n'o-do ket ar c'hoant !

Glen

Kemer ar verh vihan, heb lavared netra da zen. Lez Naig da ouela hag ar veleien da bennfolli kement ha ma karint. Te 'lavaro d'ar verhog e tistroio da ziv eur evid gwiska he dillad.

Herveig

(*o c'hoarzin*)

C'hwi 'zo yaouank, aotrou Glen, hag a gar farsal ?

Glen

Ya ! An dra-ze a zegas din da zoñj am-eus tremenet er hloerdi... (*buan*). N'eo ket ! en eur hazarn a lavaran.

Herveig

A ! c'hwi hoh-eus greet ho koñje en eur hloerdi koz, deuet breañ da veza ti-soudarded ?

Glen

Ya ! Ya !

Herveig

Ne greden ket e gwirionez ho-pije douget soudanenn.

Glen

(nehet evid respont)

Morse ! n'on bet soudanennet !

Herveig

(o poursu)

Rag gouzoud a rit ! anavezet em-eus Erwan Leskop, barazer Lantremeur. Kaset 'oa kuit ne ouzon ket pe deuz ar Pont¹⁰, pe deuz ar Halvar¹¹. Mez eun dra 'zo sur : biken maouez n'endeus kavet ! Roit kement-se da anaoud da Naig ! Evel-se... *(gweled a reer Yann o tond)*. Mez setu Yann ! Hemañ eo Glen ! *(diskouez a ra Glen da Yann)*.

¹⁰ Pont : kloerdi Poan-e-Kroaz.

¹¹ ar Halvar : kloerdi Kemper.

Kevrenn II

An heveleb re. Yann

Glen

Setu-c'hwi distro soudard !

Yann

Distroet on, aotrou !

Glen

N'ho-peus ket keuz d'an Algérie ?

Yann

Perag ar heuz-se, peogwir on distro d'am bro ?

Glen

Eno zo ivez kalz merhed koant evel er vro-mañ ? Ped plah hoh-eus bet du-hont ?

Herveig

Ped plah en-deus bet ? A ! A ! A ! klevet am-eus an dud koz o lavaroud Abd-el-Kader en-doa bet tri-hant gwreg !

Glen

(sod o c'hoarzin)

Hemañ en-doa bet tri-hant plah pemp ha tri-ugent.

Herveig

N'eo ket posubl !

Glen

Ya ! hag una ohpenn, evid ar bloavez a dri-hant deiz c'hweh ha tri-ugent.
(C'hoarzin a reont o-daou).

Herveig

Ar merhed a zo marhad mad en Algérie, evel en Lan-Devenneg, hervez al lavariou koz :
E Landevenneg
Pemp maouez evid eur gwenneg !
(C'hoarzin a reont o-daou).

Yann

Paour-kêz Heveig, te 'gred ar gevier ! *(Da Hlen)*. Mez, aotrou, gwallgomz a rit din ? N'on kement eu houër ! mez...

Glen

Penaoz, eur zouav ne oar ket farsal ?

Yann

Me 'oar c'hoarzin ha farsal gand va mignoned ; mez n'oh anavezan ket, ha ne gomprenan ket penaoz en ti-mañ...

Glen

Penazo en ti-mañ, e-leh ma oah gwechall ar mestr, e kredfen ober goap ahanoh ?
Cheñchit penn d'ar vaz, va hamarad !

Yann

Ne oan ket mestr gwechall,mez her gweled a ran, c'hwi eo ar penn amañ, hag abalamour
da ze n'eus mui netra amañ, evel diagent !

Herveig

N'em-eus lavaret netra !

Glen

(da Yann)

E gwirionez, n'on ket c'hoaz mestr, mez hebdale e vezin, rag an dud euz ar vro-mañ e fell
dezo va dimezi da intañvez ar Gall, ha foultr Doue !...

Yann

Hag e lezoh ho timezi ?

Glen

Ya !

Yann

Mez an intañvez, marteze, n'he-deus ket a garantez evidoh ?

Glen

Ne houlenan nemed eun dra : ober vad da dud ar vro-mañ en eur jeñch o fals kredennou.
Evid kement-se n'am-eus ket ezomm deuz karantez Naig ! A-walh eo din beza mestr war he
zi hag he douarou. Evidoh-c'hwi, Yann, n'hoh-eus netra da ober nemed lakaad ho treid er-
mêz euz an ti-mañ, kent hebdale.

Yann

Me 'raio ar pezh a blijjo ganin, goude m'am-bezo gwelet mistri an ti. Evid c'hoaz, n'oh ket
ar penn amañ, ha ne vezoh ket !

Herveig

Eun dra a ouzon, aotrou ! Naig ne fell ket dezi kleved komz ahanoh. Her lavaret he-deus
n'eus ket pell c'hoaz... Mez evidoh-c'hwi, Yann, ne dleit ket soñjal kaoud Naig da bried,
abalamour da genta n'oh mui ken pinvidig ha gwechall, ha d'an eil, abalamour Lan en-deus
roet e her d'an aotrou Glen !

Yann

Den ne oar petra 'dle c'hoarvezoud ganeom en amzer da zond ! Ar rezon n'on ket ken
pinvidig ha gwechall a zo mad, ha ne fell ket din lakaad den ebed en dienez. Mez an eil rezon,
ger roet gand Lan, a deho buan¹², ha den ne hello rebech da Lan, mond 'eneb e her !

Glen

Te ! eur galeour !

¹² a deho buan : ne dalv netra.

Herveig

(souezet)

C'hwi !... ne oah ket eta zouav ! mez e Biribi, gand ar zoudarded fall ?

Yann

Ne oan ket ! Piou a lavar se ?

Glen

(da Herveig)

Kredi 'rez eo êz gouzoud petra 'ra an dud-ze eet keid all dioh ar Frañs ?

Yann

Setu amañ, va leorig soudard ! C'hwi a zo mêt, hag e tleit e lenn ! Merket eo warnañ sklêr on bet zouav, ha ne gredan ket e ve Herveig diod a-walh, evid kredi ho lavariou binimuz.

Herveig

Atao am-eus klevet lavaroud oh bet zouav ! *(Trouz ar golo gaoter savet gand Herveig a ra dezo distrei outañ)*. Dizoñjet am-boia salla ar zoubenn. *(Lakaad a ra holen hag ema o vond da dañva)*.

Glen

(buan)

Perag 'ta, Herveig, e-teus lakaet en da benn tañva ar zoubenn ? *(Tana a ra e zigaretenn)*.

Yann

(outañ e-unan)

Evidon, c'hoant en-deus da hortoz kreisteiz !

Herveig

Biskoaz n'em-eus gwelet kemend-all ! Aliez koulskoude am-eus diwallet ar zoubenn ! Ma'z eus trouz etrezo diwar-benn an traou all,eh en em glevont mad diwar-benn ar zoubenn !

Glen

Ha bremañ soudard, c'hwi hoh-eus lavaret e foeltroh an dimezi ! Mez penaoz ?

Yann

An dra-mañ a zell ouzin !

Glen

Hep kas re hir va fri¹³, me 'garfe gouzoud petra 'reoh ? Ar gounnar a zo savet nebeud ha nebeud d'ho penn, va faotr ! Eur huzul a roin deoh : Lezit Annaig amañ, ha chomit e peoh en ho ti ar Gozker. Mar her havit gwelloh, gwerzit din ho plas, me e baeo eur priz mad. Evel-se ar Gozker ha Kerambeleg ne raint nemed eur verouri ; ha c'hwi a hello mond da jom e kêr e-leh ma helloh lonka dour huelenn hwero pe "absinthe", hag a zo evaj ar zoudarded.

Glen

Ho Kouenn ! Mez deuz peseurt Gouenn oh ?

¹³ Hep kas re hir va fri : heb beza kuriuz.

Yann

Deuz Gouenn ar Vretoned ! hag ar Bobl a Vreiz-Izel a zo eur brank deuz Gouenn vraz ar Gelted !

Glen

Petra livirit-hu ? C’hwi ‘zo bet soudard hag e kredit c’hoaz an diotachou-ze ? Bez’ ez eus meur a ouenn gezeg, chas, mez n’eus ket kement eur Ouenn dud : An Humanite !

Herveig

Hag ar Vori aned ?

Yann

Ober goap a hellont euz ar Ouenn, ar Hallaoued vastard-ze, hanter-Aovergnad, hag hanter-Gaskoned, pe hanter-Zaoz ! Mez, ni a vev war an douar trempet gand gwad ha ludu on tadou koz ! Ni ‘zo o chom en tiez savet ganto ! gweled a reom ar memez gwez, ar memez menezioù, ober a reom ar memez eost hag en amzer dremenet ! On daoulagad a daolom war-zu an tu all d’ar mor, hag anaoud a reom evid or breudeur ar re ‘zo o chom eno ; an dud deuz Bro-Geumri, deuz Bro-Zaoz, ha deuz Iwerzon !

Herveig

Ya, e gwirionez ! Ni a deu deuz a Vro-Zaoz, hag eul lodenn ahanom ‘zo chomet eno. Ouspenn kant vloaz ‘zo abaoe !

Yann

Lavar pemzeg kant vloaz ‘zo !

Glen

(en eur ober goap)

Ne welan ket peseurt enor eo evidoh, Bretoned, kaoud evid tadou koz, tud hanter gouez hag heb gouiziegez. Evidom-ni, Frañsizien, a gar ar Revolution he-deus degaset deom kement tra vad ‘zo en or bro !

Yann

N’on nemed eur paour-kêz soudard ! Mez gouzoud a ran istor Breiz ! Lennet am-eus kalz e-pad an nozveziou beilladeg, hag an aotrou kure a roe din leroriou !

Glen

(en eur ober goap)

Ho teskadurez a zo faoz !

Yann

N’her hredan ket ! Rag istor Breiz a zo skrivet ouspenn el leoriou ! Skrivet eo ivez gand klezeier on tadou koz ! Lavared a rit eo ar Revolution he-deus greet kement vad ‘zo er vro ! Ha me ‘lavar deoh ‘oa anavezet gouarnamant ar Bobl en amzer on tadou koz ! Hag ar vistri deuz eur vroad-tud a veze choazet e-touez ar pennou famil !

Herveig

Pep hini euz ar vistri-ze ‘oa ‘vel eur prezidant ar Republik.

Yann

Ya, netra ne veze greet heb asant peb den euz ar vroad tud !

Glen

Marteze e oa evel-se er penn kenta, mez diwezatoh oh bet evel sklavourien dindan an duked, ar varkized, o-doa e bep seurt gwir warnoh !

Yann

Ne gollin ket amzer o tiviz ganeoh. Eur ger hepken : ar vistri choazet gwechall evid komandi eur vro, ha deuet da veza aotrouien wir, en amzer Duked tennet¹⁴ deuz Frañs, ne oant nemed ar re gosa deuz Famill ar Vretoned. Ha ne felle ket dezo beza galvet¹⁵ kont, na markiz. An anoiou-ze hag ar sklavaj a zo bet degaset deom ganeoh Gallaoued, pa on-deus en em roet d'ar Frañs gand on dukez Anna¹⁶. Koulskoude, ni a zalho on lezennou, mez e-pad ar Revolution hoh-eus laeret diganeom on oll lezennou a-eneb peb gwir !

Glen

Ya ! Klevet am-eus lavared 'oa gouarnamant Breiz, a-raog ar Revolution, tost heñvel ouz gouarnamant ar Republik... Koulskoude, oh en em zavet evid divenn ar Roue !

Yann

On tadou koz+ 'zo en em zavet evid divenn Breiz hepken ! Aliez en amzer ar rouaned ivez, Breiz paour a zo bet gwallgaset ! Pa oa ar roue Loeiz XIV, an duk a Chaulnes, gouarner ar vro, a reas krouga ouspenn mil Breton. En amzer-ze ivez, eur priñs kaloneg deuz Breiz, ar marheg Loeiz a Rohan, a oe trohet e benn dioutañ er Bastill, abalamour 'oa divennour gwiriou Breiz. En amzer ma oa Rejant, Fulup Orléans, tudjentil all a oe lakaet d'ar maro en Naoned, dre gasoni ouz or bro. Koulskoude, pa weljont o oll gwiriou diskaret er memez amzer ma kouezas penn ar roue dindan ar gwillotin, ar Vretoned en em zavas, poulzet gand an dudjentil, o mignoned. On tadou koz o-dije karet ar Republik evel ar Roue, m'o-dije ar Jirondined lezet ganto lezennou o bro. Ma vije bet an treh d'ar re a gomande er Finister, en ano ar Republik, er bloavez 1794, ar Vretoned ne vijent bet morse, evid ar roue. Allaz ! ar re-ze a oe gwillotinet gand ar re ruz !

Glen

N'ouzon ket abalamour da betra ho-pije gwiriou brasoh eged ar Frañsizien all ?

Yann

Ne houlennom ket brasoh gwiriou ! Ne houlennom nemed ar justis, al lealded. Goulenn a reom ar gwir d'en em houarn on-unan dre or lezennou. Ar Frañs he-deus prometet kement-se pa roas an dukez Anna he dorn da Loeiz XII, en eur rei dezañ ar berlezenn dispar : Breiz-Izel ! Ni on-deus ar gwir da ober or lezennou, rag heb Breiz ar Frañs ne hell chom ne he sav !.

Glen

(fougeour)

Dre hoaperez eo e lavarit beza eur seurt teñzor !

Yann

¹⁴ tennet : deuet.

¹⁵ galvet : anvet.

¹⁶ gand on dukez Anna : faoz eo penn-da-benn ar pezh bet skrivet gand Abalor.

Eun teñzor om evid ar Frañs ! Abalamour d'ar servijou braz rentet dezi ! Gwechall e-touez tregont soudard an dero Josilin¹⁷, en tu all da Wened, peleh e oa ar Gall ? Ha ne oant ket deuz Breiz ar wella soudarded a vatee dindan banniel Janed d'Ark al Loren ? Ma oant servijerien galoneg d'ar Frañs, e oant ivez divennourien stard d'o gwiriou, evel Arzur Richmond !

Glen

Gweled a reer eh anavezit mad an istor ! Mez m'ho-peus labouret kalz evid ar Frañs, homañ he-deus paeet mad ahanoh, Bretoned !

Yann

Morse ar Frañs ne hello kaoud anaoudegez vad a-walh evid ar pez o-deus greet eviti ar Vretoned. Hirio c'hoaz an daou fars¹⁸ euz ar vartoloded a zo Bretoned. An hanter euz ar zoudarded 'zo euz a Vreiz ha paea a reom kalz muioh a daillou eged gwechall !

Glen

Kurun ! ne welan ket perag ne baefeh ket. C'hwi, Bretoned, 'zo dizesk, hag ho spered n'eo ket lemm. Paea a rit evid deski tud Pariz¹⁹ o-deus sperejou braz.

Yann

En em veuli a rit da veza diskaret an noblañs, hag e fell doh ober eun noblañs all deuz tud Pariz !

Glen

Roet on-deus deoh skoliou !

Yann

Er broiou all ez eus skoliou koulz hag e Frañs ! ha ni on-dije savet skoliou hep kaoud ezomm ahanoh, aotrou ! Ni ivez, a gar an deskadurez, hag en or skoliou n'on-dije ket lavaret kemend a hevier hag a livirit diwar-benn an amzer dremenet. Dreist-oll n'on-dije ket dizenoret ar brezoneg, ar yez santel-ze a gasit er-mêz euz ar skoliou, hag an Iliz !

Glen

A ! lennet ho-peus ar gourhemennou am-eus greet ?

Yann

Ya ! ha kredi a ran ne lakeoh ket an aotrou person da blega, hag e vezo greet fae war ho kourhemennou gand oll vêred Vreiz-Izel ! Pell goude ma vezoh eet e ludu, or bugale a gomzo atao yez²⁰ santel ar Zent, yez ar Roaned, yez ar Varzed, yez a Veneh a deuas e Breiz, evid sevel ar Groaz war horre ar Mênhir²¹ !

Glen

Mad-tre ! C'hwi 'zo bet soudard, mez chomet eo atao ken poud ho spered. Kredi a rit atao ar veleien, hag a-du emaoth gand ar brini du-ze²², a zo c'hwez fall ganto !

¹⁷ tregont soudard an dero Josilin, : tregont soudard, leh ma oe an emgann brudet, e-kichen eur wezenn dero, e-kichen Josilin.

¹⁸ an daou fars : an diou lodenn.

¹⁹ evid deski tud Pariz : evdi ma vefe desketoh tud Pariz.

²⁰ Pell goude ma vezoh eet e ludu, or bugale a gomzo atao yez : e spi e oa. Ma welfe penaoz ema bremañ, eur hantved war-lerh !

²¹ Mênhir : ger bet ijinet gand La Tour d'Auvergne, hag a vez kavet bremañ en oll yezou. E brezoneg e lavarer : eur peulvan. (: eur peul a van).

²² ar brini du-ze : lesano ar veleien, pa veze du o zoutanenn.

Yann

Ni Bretoned a heuill or beleien evid aferiou an ene, mez evid an aferiou all, n'eus bro ebed, hag a zo ken digabestr ha Breiz !

Glen

Paour-kêz Breiz !

Yann

Ya ! Paour-kêz Breiz, kouezet etre daouarn tud euz ho seurt ! Kas a rit er-mêz o yez, ar melezour euz o ene, serri a rit ilizou ar zent, e-leh ma kar an dud koz dond da bedi, en-dro d'ar re²³ e teu an dud yaouank d'en em voda deiz ar pardon, ha da gomañs en em gared, dindan daoulagad ar Sant Patron benniget. Ho-pet aon na deujent, eun devez, en ho-eneb, d'ho kas kuit lostenneg, goude m'o-dezo torret ho livenn-gein gand an taoliou pennbaz.

Glen

Kerzit er-mêz !

Yann

Ne din ket er-mêz, ken a raio urz Lan goz ! Eun dra a lavarinn deoh : « C'hwi a yelo er-mêz, ne vo ket pell ! »

Glen

C'hwi va haso ahann ?

Yann

N'eo ket me ho kaso !

Glen

Ha piou neuze ? Lavaret ho-peus dija re a gomzou ! Me 'zo o vond da gerhad va hamarad Lan, hag e lavaro deoh ne dleit mui distrei amañ !
(*Hemañ a ya er-mêz*).

Kevrenn III

Herveig – Yann

Herveig

Gweled a rit ar gasoni en-deus ouzoh ? En em glemm a ray euz ho komzou dirag Alan goz, hag hiviziken ne lakeoh ho treid en ti-mañ !

Yann

Ra blijo gand Doue e chomfen hepken e-pad mern ?

Herveig

Aon am-eus na zebrfeh ket eun tamm en ti-mañ !

²³ d'ar re : da bere, er skrid orin.

Yann

(en eur zevel e benn)

Lavar din, Herveig, peseurt ano a vez roet d'an hini en em vag deuz bern gwiniz eun all ?

Herveig

Klevet am-eus atao lavared eo an den-ze eun debrer diwar-goust e nesa !

Yann

Mad-tre ! Selaou ! Amañ da greisteiz e weli an debrer-ze, pe en-do c'hoant Alan, pe n'en-do ket !

Herveig

Eun dra 'zo sur ! Ne gaso ket ahanoh er-mêz. Mez ne vo ket brao deoh chom amañ gand ho mern heb e asant !

Yann

Ha me 'lavar dit e vezoh oll kontant d'am gweled o chom. *(En eur skei war e skoaz)*. Va hamarad koz, Herveig ! Kemer eur hornad²⁴ ! Petra 'zoñjfes, ma lavarfen dit kas ar paotrsaout d'ar vourh ?

Herveig

Va Doue ! mond a ray evid kerhed butun deoh, mez bremañ ema en overenn-bred !

Yann

Ya ! Evid kerhed butun hag evid kemenn d'an archerien dond amañ etre kreisteiz hag eun eur !

Herveig

D'an archerien ? Evid petra ?

Yann

Evid sina va leorig soudard.

Herveig

Kleo 'ta ! Ha c'hwi 'zo eun aotrou ker braz ma ne hellit hoh-unan mond d'an ti-kêr ?

Yann

Kredi a ran ez in eun deiz d'an ti-kêr, hag evid beza mestr eno !

Herveig

(diskredig)

Ne vezoh ket zoken kuzulier e Langarno, rag Glen a zo eun den gwelet mad gand an oll.

Yann

(en eur hoarzin)

Va Doue ! Gwella tra am-eus da ober eo digeri disklaouer braz ar skouadrenn !

Yann

Braz eo evid divenn an dud vad a-eneb ar glao. E zigeri a rin amañ da greisteiz !

²⁴ eur hornad : eur hornad butun.

Herveig

N'her gwelin ket. Me 'zo o vond da verenna da Lespervez gand Gaid, rag homañ a ro hirio eur pred krampouez evel m'eo boaz d'hen ober bep bloaz, deiz pardon Sant Kadog.

Yann

Daonet e vo tonton ! Gwelloh e rafes chom amañ, rag morse ne glevi eun istor evel an hini a gontin dit !

Herveig

Gwir eo ! an oll o-deus plijadur vraz o kleved hoh istoriou, mez ne hellan chom amañ, rag dao eo din ober ar pezh en-deus gourhemennet Glen !

Yann

Petra eo ?

Herveig

Lavaret en-deus din e rankan kemered ar verh vihan da vond ganin.

Yann

A ! ya ! me 'oar !

Herveig

(souezet)

Lavaret en-deus deoh kement-se ?

Yann

Nann ! Mez m'am hredezh, e chomi amañ evid diou rezon : da genta, te 'welo ahanon o tebri diwar-goust ar re all ! Ma vezan lakaet er-mêz dre an nor, e lammin en ti dre ar prenestr !

Herveig

Avel !

Yann

D'an eil, me a gonto dit istor preñved bihan ar major.

Herveig

Daoust hag en istor-ze, ema ar rezon evid an hini²⁵ ne fell ket deoh e ve tañvet ar zoubenn ?

Yann

Enni ema !

Herveig

Neuze, me jomo ! Daoust hag ar memez rezon en-doa an aotrou Glen evid divenn ouzom tañva ar zoubenn ?

Yann

Me 'gred !

²⁵ an hini :pehini.

Herveig

Mez neuze ! c’hwi ‘zo sammet ho-taou²⁶ evid c’hoari ?

Yann

Nann ! me ‘m-eus desket eun nebeud gand an Arabed beza sorser, hag am-eus anavezet e soñj Glen eveldon !

Herveig

Kalz sorserien ‘zo eno ?

Yann

Ouspenn unan ! Gwelet am-eus kalz anezo o faouta o hov gand o zabrenn en enor d’an diaoul ! Lod all a lonk gwer pe a vale war an tan !

Herveig

Mall o-deus eta da vervel ?

Yann

Mez ne varvont ket, va den koz ! A-veh ma vez gwelet war o hrohenn eur roudenn ruz goude m’o-deus en em roet eun taol kontell. Debri a reont gwer, ken êz ha ma tebr eur plah yaouank daou wennegad lima en eur pardon !

Herveig

Morese me ‘m-oa klevet kemend-all !

Yann

Aliez gwech e weler war ar ruiou, Maraboued a zo evel pa lavarjed, o beleien, o pourmen, loened stag a-zibouez eur gordenn !

Herveig

Kurun ! C’hwi ‘dlee beza spontet o weled kement-se ! Evidon-me am-eus gwelet eul leon o lammed dre eur helh tan da bardon hanter-miz east ! Doue ‘vo benniget ! hag e ve roet din va boued ha va butun evid netra, ne garfen ken kemered plas ar jeneral o lakae da lammad !

Yann

Peseurt jeneral ?

Herveig

Ne ouzon ket ! Eun habid jeneral a oa gantañ, ha diabarz eur gaoued ‘oa !

Yann

(o c’hoarzin)

An den-ze a vez galvet²⁷ eur reizer anevaled pe “un dompteur“ e galleg. Da genta an dud en em gav euz eul leh all er vro-ze, a vez spontet. Mez dond a reont da voaza. Ni ‘oa eno eun nebeud Bretoned vad ! Va rujumant ‘oa tost d’ar mor en eun enezenn anvet Sidi-Ferruch. Daoust ma’z eo al lodenn vihanna deuz Skouadrenn Sao-Heol Moko, eul lodenn vad anezo a zo martoloded deuz Breiz. Pa welem ar re-mañ, ni ‘zoñje deom, ‘oam en or bro !

²⁶ c’hwi ‘zo sammet ho-taou : c’hwi ‘zo en em glevet ho-taou

²⁷ galvet : a vez greet anezañ

Herveig

C’hwï ‘gave eno kalz martoloded deuz Breiz-Izel ?

Yann

Ya, sklêr ! Deuz peleh e hell beza martoloded Frañs, nemed deuz Breiz-Izel ?
Pell ‘zo ne ve Frañs ebed ma ne vije bet divennet gand Breiz !

Herveig

Mez an aotrou Glen en-deus lavaret din eo Breiz netra, hag e vije ar Frañs heb ar Barizianed an disterra vro war an douar !

Yann

(E-pad ma komz Yann, Herveig a gav mad ar pezh a lavar, evel en despet dezañ)

Ma ne vije kement a Barizianed e Frañs, homañ a vije galvet²⁸ Frañs ar hlabouserien. Mez Herveig paour, ma ne vije ken kêriou, ken parkeier nemed Pariz, ar Frañs ne ve netra nemed eun ti evid ar re zod ! Pariz a rank kemer en on touez-ni tud desket n’eo ket c’hoaz divouedet o empenn. Brava enoriou Frañs eo enoriou ar Proviñs, hag ar re-mañ koulskoude a zo disprizet gand tud Pariz ! War deg den brudet er Frañs, nao anezo a zo deuz mêz Pariz. Goulenn digand eur Parizian deuz peleh eo e vamm hag e dad ! Unan a responto : « Deuz al Languedoc », unan all « Deuz Dunkerque ». Unan a zo deuz ar Spagn, eun all deuz ar Zerbi. An niver brasa anezo a zo brabañserien ! fougierien ! Da ouenn dud-te, Herveig, ‘deus bevet war an douar-mañ, e-pad meur a gant vloaz, ha desket e-teus ar pezh a anaveze da dud koz ! Labourad a rez heb ehan, an douar, o tiruilla ‘doug an deiz euz da dal, mez beo e peoh, en eur zoubla da volontez da hini an aotrou Doue ! Hag eun devez, heb aon, e weli ar maro o tond gand esperañs, hag ar re-ze n’o-deus ket... esperañs en eur vuhez all, esperañs euz eur baradoz e-leh ma vezi eüruz gand Doue, santez Anna, hag oll zent he santezed deuz Breiz-Izel !

Herveig

Aliez am-eus soñjet n’em-oa plijadur ebed o veva e Pariz, rag eno an dud a zo re vervet o gwazied ‘mechañs !

Yann

Ra vezo eta da vro da foug ! Homañ eo douar ar zoudarded vrudet, ar vartoloded, ar varzed hag ar Zent. Da vro eo douar Nominoe, an Tregont²⁹, Gwesclin, La Tour d’Auvergne, ar Flô ! Eno o-deus kanet Gwenc’hlan, Taliezin, Brizeug, Luzel, Kermarker. Eno o-deus pedet Kaorintin, Paol, Samson, Konvoion, hag ar re all a zo er baradoz bremañ ! Ha na zizoñj ket ez eo ivez douar an dud desket braz, Laenneg, Gonideg, Gwepin, douar ar varzed kizellerien vein, evel ar re a zavas gwechall Kreiskêr, eur chañson greet gand dantelez vein. Ke ‘ta, Herveig koz ! Breiz a hell beza fier euz he bugale. Mar dint bet gwechall tud desket, a beb anzer, ar vugale vihan n’emaint ket war o lerh. Breiz a zo evel eur park douar mad e-leh ma poulz c’hoaz, bokedou an enor, ha rozenn ar mirit ! Mez, daoust ha n’eus ket el leur eur vaouez o ouela ; *(Kleved a reer hirvoudou en diavêz).*

Herveig

(o selaou)

Hag ar vaouez-se a deu war-zu an ti ?

²⁸ galvet : greet anezi.

²⁹ an Tregont : e1351.

Yann

(o weled Naig o tond)

Va Doue ! Naig eo ! Pebez glahar ! N'ouzon ket ha me a hell en em ziskouez bremañ !

Kevrenn IV

An heveleb re – Naig

(Naig o veza na wele den, a ya da azeza war skaoñ an daol. An daou zen a jom sioul).

Naig

Gwerhez Vari ! a zo bet treuzet ho kalon gand seiz kleze ! Ho-pet truez ouzin hag ouz an dud euz an ti-mañ ! Gwechall 'oan ar vestrez amañ, hag enoret gand an oll, ha bemdez bremañ e welan va galloud o vihannaad a nebeud da nebeud, hag eet dija etre daouarn an estren-ze ! Va Doue ! roet hoh-eus din va lod poaniou, ha koulskoude on bet ho servicherez vad. Ra vezo benniget hoh ano ! Gouzoud a ran e tle kalon an den just beza gwasket gand an anken evid galloud mond beteg ennoh ! Koulskoude, eun dra drist eo evid eur vamm koll ar galloud da gelenn he hrouadur, evel m'he-deus c'hoant ha da voulla e galon er memez amzer ma veillo war e vadou ! *(An daerou a zired deuz he daoulagad).*

Herveig

(outañ e-unan)

Homañ a anavez ar varnedigez !

Naig

(outi heh-unan)

Mez ar ger diweza n'eo ket lavaret c'hoaz ! Me 'gaso an afer dirag barnerien uheloh. Ma'z eus c'hoaz war an douar barnerien leal, e tisklêrjint n'on ket na sod nag eun intañvez n'eo ket gouest da ren he ziegez ! Ha diskiant on, abalamour eo plijet ganin, sevel Marivonig e doujañs Doue, abalamour eo plijet ganin deski dezi ar brezoneg, yez santel va zadou koz ? Gwechall an dud a vije eet e kounnar oh an den fall-ze hag o-dije kaset anezañ pell ahann ! Hirio, den ne gredo sevel evid milliga Glen ! *(An daerou a gouez puill euz he daoulagad).*

Yann

(a dosta outi goustadig, hag a ziskroaz he daouarn kroazet war he dremm).

Eun den 'zo savet, Naig ! ha me 'zo an den-ze !

Naig

C'hwi ? Peseurt gwiskamant ! Mez ar vouez-se ! *(Sevel a ra, hag e sell outañ).*

Yann

Ya, Naig karet ! Yann distroet d'ar gêr gand Doue ar Vretoned, goude beza bet pell ankounac'haet, hag e-mêz bro ! Yann distroet d'ar gêr evid ho savetei !

Naig

A ! paour-kêz Yann, an anken he-deus nijet war an ti-mañ, evel ar sparfell war an alhweder abaoe ma oah eet kuit. Loeiz ar Gall, oan dimezet dezañ en despet din, a zo bremañ maro. Doue r'e bardono ! Lezet en-deus ganin eur verh. He gweled a reoh bremaig gand he zad-koz. Loeiz ar Gall a oa eun den mad, mez eur spered uhel ha droug. Abalamour da ze e varo a reas meur a zen eüruz er barrez, hag an oll 'oa plijadur ganto gweled a-nevez va zad e penn an ti-

kêr hag e penn ar plas-mañ. Anaoud a rit Lan goz, eun den euz ar re wella eo, mez atao en-deus darempredet ar vourhizien, hag evel-se eo troet diwar an hent mad, evel kalz re all. Herveig a zo unan euz an dud reuzeudig-se. Herveig a oa gwechall...

Herveig

Gwechall n'eo ket bremañ eo ! Ar merhed ne gomprenont seurt war ar politik !

Naig

(o poursu)

Degouezet zo amañ eun den anvet Glen.

Yann

Gouzoud a ran, Naig, rag Herveig en-deus her lavaret din. Lavarit din diohtu petra 'ra deoh gouela ?

Naig

An den-ze a zo deuet nebeud ha nebeud da veza mestr er vro-mañ, da veza mestr euz ar plas-mañ ! O weled ne felle ket din kemered anezañ da bried, en-deus aliet va zad da denna diganin va gwiriou, war digarez on sod ! Tapet 'oan bet en e rouejou, en eur zina paperou faoz ! Bremañ, gward ar vinourez 'vezo roet da Hlen, rag va zad, hervez al lezenn, a hell refuz war e digarez.. Setu ar pez en-deus roet din da anaoud an urcher Barget a deuy amañ warhoaz evid roi din paper ar zetañs !

Yann

Pebez diaoul ar Glen-ze ! Luziet oh gantañ, tu al lezennou. Med koulskoude, petra en-deus c'hoant da ober ?

Naig

C'hoant en-deus da gaoud madou hag ene ar vinourez. Gallouduz dre ma veze mestr war ar gêr-mañ, e ray ar pez a garo er vro. Kas a ray Doue hag ar zent er-mêz euz an iliz, hag or yez vrezonég a vezo hiviziken siellet war on teodou !

Yann

Malloz ruz d'an den-ze ! Mez Doue n'en-deus ket ho tilezet : a-benn nebeud e rento deoh ho tanvez ! ha ne welit ket kement-se, Naig ? Ar zilvidigez n'ema morse ken tost ha pa gav deom eo kollet peb fiziañs. Mez setu Alan goz o tond ! Na ouelit ket ! Ha te, Herveig, gwel mad petra 'hoarvezo.

Kevrenn V

An heveleb re) Alan *(teñval e benn)*

Yann

(en eur vond war-zu Alan)

Eur bijadur eo evidon ho saludi !

Yann

(hep hast)

Setu-te distro neuze !

Yann

Ya ! Eüruz ha kontant !

Alan

Chom a ri bremañ er barrez ?

Yann

Va zoñj eo !

Alan

Neuze, evid beza enoret er barrez e rankez diwall da lavared traou diêz d'ar re o-deus danvez. A-hend-all, 'oa gwelloc'h dit beza chomet en Algérie !

Yann

O ! daoust hag ar pesk-se krohennet ker brao gand e lost-bik, en-deus komzet deoh deuz or chikan ?

Alan

Komzet en-deus, hag on souezet penaoz eun den desket evel-dout hag a zo bet soudard...

Yann

(o poursu)

Na vezet ket poaniet gand lavariou eur hanfard evel-se, deuet da lakaad an drouz er familllou ? Eur gwir Breton ne vezo morse kamarad d'an hini a laka ar merhed da ouela !

Alan

(en eur zelled oh Naig, azezet ha trist meurbed)

Petra 'zo c'hoarvezet ganti ?

Herveig

Gwelet he-deus an urcher Barget, en-deus komzet dezi euz ar zetañs !

Alan

(a ya war-zu an oaled hag a dan e gornad-butun)

Ma karje beza fur, rhon ! rhon ! evel ma lavarer ! (*Da Naig*). Daonet e vezin, va merh ? Ar pez hoh-eus gwella da ober eo trei ho kalon da zimezi. Evel-se e vezoh mestrez amañ adarre !

Yann

Amañ ? Gwasoh eged e bro Mahomed... Du-hont, pa 'deus c'hoant eur vaoue da zimezi...

Alan

Me va-unan eo am-eus renket an traou evel-se ; hag al lezenn 'zo evidon !

Yann

Paour-kêz Lan, ne roan ket meuleudi deoh evid kement-se !

Alan

(dre hoaperez)

Gwelloc'h em-ije greet goulenn kuzul diganez ? Mez glaharet 'oan o rankoud lavared dit n'ema mui an traou amañ evel gwechall. Daoust ma kar va merh ahanout, ne vezin ket sod a-

walh evid he rei dit ! Da vamm Katell he-deus kalz arhant lakaet war interest war an hentchou-houarn hag a zo kollet ! Gwerzet eo ganti Park-an-Deleñn, Liorz-ar-Frankiziou, Prad-ar-Giziou. A-benn nebeud ne jomo mui nemed peder moger an ti, hag e gwirionez, kement-se ‘zo nebeud da lakaad e-keñver plas kaer Kerambeleg, ha madou ar vinourez euz kostez he zad, Loeiz ar Gall !

Herveig
(*da Yann*)

Gweled a rit mad !

Yann

Mez Lan ! ne houlenñan netra diganeoh !

Alan
(*dinehet*)

Gwell aze ! Rag evel ma weli, greet ar soñj ! Naig ne zimezo nemed da Hlen. Eun den eo diou ar hiz ! eun den en-deus kalz danvez er Gaskogn, hag a dremen kalz amzer e Pariz !

Yann

Ha klevet hoh-eus kement-se gand rener an douarou, pe gand dastumer an taillou e Bourdel ?

Alan

Nann ! Glen hepken en-deus desket din kement-se. Ha penaoz kaoud disfiziañs war eun den a zo mignon d’ar prefet ha da varnerien al lez-varniou ?

Yann
(*outañ e-unan hago c’hoarzin*)

Ar vignoned-se a vezo bremañ talvouduz dezañ ! (*a vouez uhel*). Mad eo a-wechou kaoud mignoned e-touez ar varnerien !

Alan
(*hep teuler evez*)

Ar pezh ‘zo greet, ‘zo greet ganin ! Naig, perag ne drempez ket ar zoubenn ? (*outañ e-unan gand glahar*). Truez eo he gweled !

Herveig
(*en eur zelled ouz an orolaj*)

Kreisteiz hebdale, a gredan ! Orolaj ar vourh a zon. Hag ar Vona goz n’eo ket c’hoaz distro !

Kevrenn VI

An heveleb re – Marivonig, Perig

Marivonig

Va mamm garet !

Naig

(en eur bokaddezi)

Va merh ! *(Selled a ra oh Yann).*

Yann

(Hep teuler evez)

Kleo 'ta, poatr-saout ! Mond a ri d'ar vourh da gerhad daouwennegad butun, ha war ar memez trao e roi ar paper-mañ da gomandant an archerien.

Perig

Ya, soudard ! Marivonig, deuit ganin d'ar vourh !

Naig

Ya, it assemblez gand Perig ! *(Mond a ra ar vugale).*

Kevrenn VII

Alan, Yann, Herveig, Naig, Mona

Alan

Emaoh diwevad o tistroi, Mon !

Mona

Biken ne zizoñjin ar pezh am-eus klevet !

Alan

Petra ? Petra ? spontet oh ?

Mona

N'eo ket souez ! *(en eur ouela, e kemer ar plad soubenn, hag e troh ar bara).* E-kreiz ar blasenn, dirag an iliz, Jakez ar Gov, Fañch ar Bleiz, pignet war ar Groaz, a lavare d'an dud bodet en-dro dezo : « Serret eo chapel sant Kadog dre urz Glen ! » Klask a reent rei da gomprenn d'anoll barrezioniz o-doa greet eun dra fall, en eur choaz Glen da vêr. Kalz gourenerien 'oa deuet deuz ar parrezioù tro-war-dro, kounnaret oll, hag a lavare e kemerfent e vuhez digand Glen !

Herveig

Avel !

Alan

Feiz Doue ! Lavaret am-boea kement-se da Hlen er beure-mañ !

Mona

(En eur gemered ar plad soubenn a ya war-zu an oaled)

Sallet e-teus ar zoubenn, Herveig ?

Herveig

Daonet e vo ! N'ouzon ket... N'em-eus he zañvaet !

Mona

Perag ?

Herveig

An aotrou Glen ha Yann...

Mona

Yann ! Jezuz ! (*Pokad a ra dezañ*).

Herveig

Ya ! an aotrou Glen ha Yann a oa o-daou war va hein. O-daou o-deus divennet ouzin tañva ar zoubenn. Yann a lavar eo abalamour ma'z eus enni preñved bihan fall a ro ar hleñved, hervez ar medisin-major.

Mona

(*a oa o vond da dañva ar zoubenn*)

Peseurt anevaled eo ar re-ze ?

Yann

(*buan*)

Na dañva ket, en an' Doue ! (*sioul*). Me 'gonto deoh eun istor pa vo an aotrou Glen amañ. Neuze e vezo gwelet hag-eñ en-deus ar memez rezon ganin, evid divenn ouzoh tañva ar zoubenn.

Alan

(*da Vona*)

M'en-deus lavaret Glen an dra-ze, na dañvait ket !

Mona

An dra-mañ 'zo souezuz !

Alan

Dond a ray hebdale ! Mez me 'gred, ma Yann ker, eo gwelloc'h dit mond er-mêz euz an ti. Da loa-veuz a zo aze el listrier abaoe meur a vloavez dija ! Kemer anezi ha kerz er-mêz !

Herveig ha Mona

(*a-unan*)

Hag istor ar preñved ?

Alan

Eur wech e vo kontet !

Yann

(*a jom*)

Va Doue ! Mar plij ganeoh, me 'zo gwelloc'h ganin he honta hirio. (*Outañ e-unan*). Va Doue ! sikourit ahanon !

Naig

(en eur zevel eun nebeudig he fenn)

Va zad ! Kas a reoh er-mêz mab ho kamarad koz Gwiklan ar Barz ?

Herveig

Gwelom, Alan goz, abalamour ma'z eus bet trouz er mintin-mañ etre Glen ha Yann, ne dleont ket evid an dra-ze chom atao enebourien ! Gwelloh eo dezo en em unani.

Alan

Gwir eo ! *(Da Yann)*. Chom amañ neuze, mez na lavar netra ! Setu an aotrou Glen. *(Naig a ya er-mêz)*.

Kevrenn VIII

Alan, Herveig, Yann, Glen, Mona

Glen

(ne wel ket Yann)

N'en em gavan ket re ziwevad, a gredan ? N'eo ket c'hoaz komañset ar pred ? N'eus ket kalz a fouge ennon, m'her lavar deoh !

Alan

Eun enor braz eo evidom ho kaoud amañ evid preja, hag ho kortozet on-deus ! Ma Doue ! n'eo ket braz ar friko ! soubenn fresk, kig-vejenn, farz-mañch, ha kafe war-lerh !

Glen

Eur pred-eured eo ! En amzer Cincinnatus ar Romaned kaled en em vage evel-se. *(Outañ e-unan)*. Gand nebeud a dra ! Gwelloh e tebran er gêr !

Herveig

N'em-eus morse klevet ano deuz Sant Sinatus !

Glen

N'eo ket eur zant eo ! mez eur houër deuz Rom a deuas da veza eur jeneral braz. Me 'gomz dit anezañ. Bremaig... Mez n'out ket eet da weled Gaid Lespervez ? Ha Marivonig ?

Herveig

N'am-eus ket he havet !

Glen

(nehet)

Me 'zoñj emañ o c'hoari ! Mez azezom oh taol. *(Mona a deu hag a ya en ti. Azeza 'reont oll)*. A ! A ! mervel a ran gand an naon ! *(Gweled a ra Yann, hag e chom sebezet)*. Aotrou Alan, ne hellan azeza e-keñver ar zoudard-se en-deus taolet kement a zismegañs warnon-me, mêt ar barrez-mañ ! Ha lavaret am-eus deoh her lakaad er-mêz euz an ti !

Alan

Her gouzoud a arn !.. Mez...

Glen

(a zao buan)

Neuze ez an kuit !

Herveig

(a beg ennañ)

Nann ! Chomit ! Alo ! peseurt afer ? N'en em anavezit ket c'hoaz etrezoh. Gwelloh eo beva e peoh ! *(Azeza a reont oll, ha Glen 'zo kalz nehet c'hoaz. Mona a zegas ar zoubenn).*

Yann

(a gemer al loa-bod)

Sellit, aotrou mêt ! Me a fell din diskouez am-eus c'hoant da veva e peoh ganeoh peogwir on hoh amezeg. Me 'houleñn hoh aotre d'ho servija da genta.

Glen

(nehet braz)

O nann ! O nann !

Yann

Evel-se ! Evel-se ! *(Servija a ra ar mêt hepken, hag e lez ar re all a-gostez).*

Glen

Ar zoubenn-mañ a gleo³⁰ c'hwez vad ! *(Pourmen a ra e loa en-dro d'e blad).* Mez e peleh emañ Naig ?

Alan

Azet eo war ar mên-puñs, he gweled a ran dre ar prenest.

Glen

(outañ e-unan)

Toud pe netra ! Ha Marivonig, n'eo ket degouezet c'hoaz ?

Herveig

Eet eo d'ar vourh gand ar paotr-saout.

Glen

Pep tra 'zo mad ! Me fell ankounac'haad ar pezh a zo c'hoarvezet er mintin-mañ ha konta a rin bremañ da Herveig, istor Cinsinatus.

Herveig

Hoh istor a dle beza brao-tre ! Mez a-raog... Lavarit din perag ne fell ket deoh tañva ar zoubenn. *(Da Yann, ne zervij ket ar re all).* Me 'gred e hellom bremañ he zañva. *(C'hoarzin a ra).* Ma soñjit disheñvel diwar-benn kalz a draou eh en em unanit diwar-benn ar zoubenn ! Major Algérie, hervez Yann a zivenn....

Yann

(da Hlen en-deus c'hoant da vond er-mêz).

Petra 'hoarvez ganeoh, aotrou Glen ? C'hwi 'zo klañv ? Chomit eur pennadig, mar plij ! *(Glen, aon dezañ, rag lagad Yann a jom warnañ. Yann a zo en e zao).* Selaouit oll ! Al

³⁰ a gleo : ? a zo c'hwez vad ganti.

legumaj n'int ket poaz ! (*Trei a ra zoubenn gand al loa-bod*). Hag an dra-ze 'zo kaoz na zebrit ket, aotrou Glen ?

Glen
(*drouglivet*)

Derbri a ran !

Yann
(*o para warnañ e zaoulagad muioh-ha mui*).

En ho plad me wel eun irvinenn, a zo kaled, a gredan ! Nann ! Al lgeumaj n'int ket poaz, Lan ! M'ho-pije ar vadelez da droha an irvinenn-ze, aotrou Glen ? Setu amañ ho kontell vihan ! Marteze an irvinenn-ze eo ar rutabaga a zo bet poazet en enor Athènes ?

Glen
(*bisteod*)
Pe-pe-petar 'fell-fell deoh la-lavared, humf³¹?

Yann
(*o poursu*)
Bez' eo eur pembiz a ziskouez bremañ d'an oll ez oh eun ampoezoner hag eur gaouiad. (*Oll e savont spontet. Glen a fell dezañ mond kuit, mez koueza a ra war eur gador evel seizet, Yann dirazañ*).

Alan
Petra eo kement-se ?

Yann
An dra-ze a ziskouez deoh sklêr on degaset amañ gand Doue, evid ho savetei oll. Pa oan degouezet en ti-mañ ne oa den all ennañ. Klevet am-eus ar ribot³²-mañ o vale el leur, hag on en em guzet e kambr al laez. Her gwelet am-eus o lakaad er gaoter eur pembiz a zo heñvel e gwirionez oh eun irvinenn.

Glen
(*gand hardiegez*)
N'eo ket gwir ! N'eo ket gwir ! Na gredit ket ar gaou-ze, kristenien !

Yann
Hag ar gontell-mañ ? Ha din-me eo ?

Glen
Ne ouzon ket ! Ne ouzon ket !

Alan
(*sebezet*)
Gwerhez Varia War Zikur !

³¹ humf : estlamadenn.

³² ribot : an den fall.

Yann

Alan ! Sachit e zorn kleiz a zalh kuzet, hag e weloh eo trohet gand ar gontell-mañ, lezet war an daol. (*Alan a zach dorn Glen. Oll e tostaont, hag e reont an dro d'an den tamallet*).

Herveig

Evel-se ! anez ho sikour, 'oam oll bremañ maro !

Yann

Oll ! nemed ar vinourez, ha te ivez marteze !

Herveig

Me !

Yann

Te ! Ha n'e-teus ket a zoñj en-doa c'hoant da gas ahanout da weled Gaid Lespervez... Evid da damall goude-ze ! Da benn a vije ruillet dindan kontell at willotin, ha koulskoude out den a enor !

Herveig

Kurun ! (*Lakaad a ra e zorn war e houzoug*).

Alan

(*da Hlen*)

Mez en em zivennit, aotrou Glen ! Lavarit ha n'eo ket gwir eo eun taol spontuz ! Petra 'zleom da zoñjal ?

Glen

N'eo ket gwir ! Te, soudard eo e-teus greet an taol, marteze !

Yann

A ! setu eun diskan all ! Me eo am-eus poulzet ar paour-kêz Lan da lammed he gwiriou digand e verh, evid kaoud va-unan gward Marivonig, ha dimezi dezi, goude ma vije deuet da veza eur vaouez heb feiz, nahet ganti he yez hag he gouenn ? Me eo am-eus klasket laza Lan goz, ha tud e di ? (*Er stalaf e klever youhadennou : « En dour ! En dour ! Glen d'an traoñ ! »*). Setu amañ penaoz e vo kastizet ! Petra 'hoari gand ar re-mañ ? Kit da weled, Alan ! Evidon, me a zalh al lapous-mañ ! (*Sikouret gand Herveig, e stag daouarn Glen a-dreñv e gein, gand eur mouchouer*).

Kevrenn IX

An hevelb re, Jakez, Ar Gov, Peizanted,
deuet gand o fenn-baz ha droug enno

Jakez

(*En eur zond*)

C'hwi 'lavaro, Lan, d'ar mêr a zo amañ o tebri, e vezo taolet er mor, ma ne fell ket dezañ digori ar japel !

Alan

Taolit anezañ e-barz mar kirit !

Jakez
(*souezet*)

Hañ ?

Alan

Feiz ! n'on ket ken stag-se ouz e relegou ! Ne vo ket pell mêt 'barz ar barrez, rag kontell ar willotin 'zo dija a-uz d'e benn !

Jakez

Petra lavarit ?

An oll
(*a-unan*)

Setu Glen ! Setu Glen !

Jakez

Petra en-deus greet ?

Alan

Klasket en-deus va ampoezoni, me ha va familh !

An oll

A ! loustoni 'zo anezañ ! (*An eil d'egile*). Me 'm-oa her lavaret dit !

Alan

Hag anez Yann ar Barz a zo aze...

An oll
(*Laouen*)

Yann ar Barz, n'out ket c'hoaz maro ?

Yann

Fezi ! me 'zo evel ma welit ! Deuet on abred a-walh evid dizolei dremm an den milliget-ze !

Jakez

Sant Kadog en-deus her hastizet ! Miret en-doa ober e bardon. Mez te, deuz peleh e teuez ?

Yann

M'her lavaro dit diwezatoh. Bremañ eo red lakaad ar fripon-ze etre daouarn an archerien !

Jakez

Feiz, Yann ! n'eus ket pell ahann da eun toull don ! (*E-pad an amzer-ze, Glen e skrign e zent*).

An oll

Ya ! Taolom anezañ e-barz, evel eur hi klañv !

Yann

Na reom ket kement-se ! Emañ an archerien o tond ! Ar re-mañ 'zo karget gand ar Vro euz ar gevridi-ze !

Kevrenn X

An heveleb re. Archerien ?

Kenta archer

Salud deoh ! An aotrou mêt en-deus or pedet da gemered eur banne kafe ; ar pezh a zo eun enor evidom evel ma lavarere !

Yann

Deuit dre an hent-mañ, brigadier ! Goulennit digand ar mêt a zo azezet dirazoh war eur gador, petra en-deus da lavared deoh.

Kenta archer

(en eur ober salud soudard)

Aotrou mêt, salud !

Eil archer

(idem)

Salud, aotrou mêt !

Kenta archer

Eun dra bennag 'zo da ober evidoh ? *(Glen, kollet benn, ne respont ket)*.
Ha c'hwi 'zo klañv ?

Yann

E zaouarn 'zo maro. Ni on-deus staget an aotrou !

Kenta archer

(e kounnar)

C'hwi hoh-eus kredet liamma an aotrou mêt ?

Herveig

Ya ! Ha me 'm-eus roet an dorn d'ar zoudard evid hen ober !

Eil archer

Respet deoh, brigadier, ne gomprenan netra. Hemañ 'zo sifilennet evel eun anduillenn !

Yann

Kasit anezañ ganeoh ! Hemañ 'zo eur gouiad ! C'hoant en-doa da laza e famill dre ar poezon. Diskuillet eo gand ar gontell vihan-mañ he-deus trohet ar pempiz lakaet gantañ er zoubenn e plas irvin pe e plas rutabaga !

Kenta archer

Hag an dra-ze 'zo gwir ?

Alan

Ya, gwir eo ! Hemañ en-deus anzavet, mez bremañ an enkreiz a ra dezañ tevel !

Glen

(en eur gemered eun nebeud kalon)

Kasit ahanon ganeoh, evid na jomin ket pelloh e-touez ar moh-mañ diwar ar mêz. Me 'm-eus greet an taol ; evid kaoud abred danvez Lan goz, rag va-unan n'em-eus netra : Paourroh on eged eur pillaoer. Choariet am-eus en eur lakaad e klaoustri toud pe netra. Kollet on. Paea a rin ! *(Tevel a ra hag e sell ouz Lan gand kounnar)*. Ar Barz milliget-se en-deus bet ar gounid warnon ! Marteze re all a gavo pleg d'ober an taol ! *(Mond a ra gand an archerien o-deus lakaet dezañ ar manegou houarn)*.

Kevrenn XI

An heveleb re, nemed Glen hag an archerien

Alan

Lavaret en-deus : « Re all a deuiio 'benn d'ober an taol ! » Mez m'hen tou ! Biken ne vo eun estren mestr amañ ! O ! gweled a ran bremañ ne oa nemed Annaig, fur, en ti-mañ, abalamour ne helle ket gouzañv an estren-ze. Ni 'zo bet en em faziet, Herveig !

Herveig

Evidon-me ne oan ket a-du gantañ ! Hag abaoe m'en-doa divennet komz brezoneg en ilizou, feiz ! ne gave ket din 'oa kalz a dra touch eur skoed ar bloaz. Kurun ! Hemañ en-doa c'hoant da gas ahanon d'ar willotin ! *(Lakaad a ra e zorn war e houzoug)*.

Alan

(gand eur c'hoarz trist).

Da leve ne oa ket braz ! Mez me a anzao ouzoh, va mignonned, 'oan gouenzet d'e gredennou. En em fazia am-eus greet ! Eun enebour da Zoue ha da Vreiz ne hell beza nemed c'hwez fall gantañ. Me 'fell din repara an droug am-eus greet dre va skwer fall. Hag evel m'on deuet re goz evid ober eun dra bennag a vad, goulenn a rin digand Lan ar Barz ha kontant eo da gemered da bried eun intañvez en-deus anavezet gwechall plah yaouank ?

Yann

Hag a garan ato !

Alan

N'on ket pinvidig ! Mez gand va arahnt e vezo prenet a-nevez Park-an-Delellenn, ha Prad-ar-Frankizou.

An oll

You da Alan ! You da Lan !

Herveig

(laouen)

Sant Kadog benniget, setu Lan ar Barz mestr e Kerbeleg. Mez e peleh emañ Naig ?

Kevrenn XII

An heveleb re. Naig, Marivonig.

(Moan goz a deu hag a ya gand chistr ha chopinadou)

Naig

Seu-me degouezet !

Alan

Ha c’hwi ‘ve eüruz da rei ho tornig d’an den yaouank-se ?

Naig

(en eur ruzia)

Setu va brasa c’hoant ! *(rei a reont o dorn an eil d’egile).*

Yann

Naig, va fried ! *(Hag e pok dezi).*

Naig

(en eur zegas Marivonig d’e gaoud)

Kared a reoh ivez ar verh-mañ ?

Yann

A-greiz kalon !

Marivonig

Me ho kav dija evel eun tad ! ‘Hed va buhez, me heulio ho kenteliou.

Yann

(en eur bokad dezi)

Ganin-me, o ! rouanezig an ti, c’hwi a vezo atao eur wir Vreizadez. *(Da Naig, ‘n eur gemered adarre he dorn).* Dalhet ho-peus ho kwalenn erminig ?

Naig

Biskoaz n’em-eus he dilezet !

Yann

Greet he-deus hoh eürusted ! An imaj eo deuz Breiz atao yaouank, atao kaer, eveldoh, va haret ! *(D’an oll).* Kamaraded ! Naig hag he zad ‘zo bet diwallet diroh eun droug braz. Naig a zo bet paeet gand Doue, evid beza dalhet mad da gared gizioù ha tud he bro. Evelt en em zivennom ouz an estren !

Jakez

Estren ebed ne vo mêt en or bro ! D’ar votadeg kenta, lakaom Yann e penn an ti-kêr !

An oll

Ya ! you da Yann Barz, mêt !

Yann

Ho trugarekaad evid ar fiziañs a lakit ennon, kamaraded ! Evel Naig, divennom a-eneb an estren or haerra teñzoriou, or yez, or gizioù, or beleien speredeg, or zent koz ! Bevom war an douar-mañ trempet gand ludu on tadou koz. Dougom atao respet d'ar re 'zo bet en on raog. Heuillom ar skweriou o-deus roet deom. Gwir eo, kemm a zo hirio hag etre gwechall. Ar fraill he-deus roet plas d'ar mekanik, ar vederez a ra hirio al labour a ree gwechall ar falh. E-leh an trañch e welom hirio an eler Braban. E-leh mond d'ar marhad war an troad e kemerer ar harr treinet gand eur marh-houarn. Lavared a reer emañ en eun amzer war-well : Mad ! Klaskom gwellaad eta an traou, ha deskom bemdez eun dra bennag muioh eged n'o-deus desket deom on tadou koz. Mez, n'o disprizom ket, abalamour ne oant ket ken desket ha ni, gand aon na vem disprizet on-unan gand or bugale a hello deski muioh evidom. An deskadurez a deu deom a-berz on tadou koz a zo evel eun teñzor dastumet gweneg ha gweneg. Kreskom an teñzor-ze dre on oberou on-unan hap kaoud dispriziañs evid ar pez a zo bet greet gand ar re Gosoh !

Bretoned a galon, a ouenn, a yez, a wiskamant, bezom tud da vond war-raog, bodet en-dro da Vanniel or Bro, dindan lagad Doue on tadou, dindan lagad an Anaon a veill warnom !

Alan

Kamaraded ! Mona he-deus degaset chistr ha n'eo ket eur poezon. Hag e hellit kredi ! Dond a ra euz ar hao don, warnañ doriou alhwezet mad ! Evom en enor da Vreiz ! Ha va mab Yann a gano deoh eur chañson nevez !

An oll

Eur werz ! Yehed mad deoh ! *(eva a reont)*

War bord an teatr, Yann a gan wareun don nevez.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

I

Koz eo va gouenn evel ar bed
Uhel he fenn 'barz an Anken !
Gortoz a ra heb aon ebed
Ar boan a zo he flanedenn !

Abaoe m'eo paotred Gomer³³
Pellaet an eil diou egile
Daou vranc³⁴ eur wezenn e weler
O skuilla disheol war Mein-bez !

II

'Touez ar Halled lugernuz
Hag ar Vretoned kreñv 'vel dir,
Tro ar wezenn, 'valee eüruz
Or Hendadou a vuhez hir !
Dindan lagad Yor³⁵, tad an Dud
Kreski 'ra an deliou nevez,
Hag ar hev koz a gav e vrud
Flouret gand Alan an Êlez !

III

Gwalhi a ra an Anaon
Peb gouli greet d'ar Gelted
Gand bouhal vrezel ar Zaozon,
Ha goaf lezenn ar Hallaoued.
Pa houzañv ar Helt 'n e galon
Dre vroud lemm ha kriz ar glahar
E hendad gael pe breton
A skuill balsam dous ha dispar.

IV

Plennaad a ra 'n hent digompez
Ya dre 'n Abred³⁶ ankeniuz
Deuz an Annouf³⁷ ken dienez
D'ar Gwened³⁸ laouen ha skeduz.
Lugerni 'ra 'vel eun tourtan
O rei sklêrder, an nerz kalon
D'ar Helt spontet e Tremenvan
'Vel eur vagig war ar Raz don !

VI

An tad-koz 'lar d'ar re veo
Berr gwelet gante ar vuhez
'Ya o gwrizien³⁹ treñk ha c'hwero,
Don en tu all da doull ar bez !
O soñjal 'n e ouenn greñv meurbed.
Ar houër a anavez e vraster
Dijentiled eo ar Gelted,
Noblañsou kosoh ne gaver !

³³ Gomer : notenn, e galleg, gand an oberour : Gomer, père des Celtes.

³⁴ Daou vranc : notenn, e galleg, gand an oberour : Les Celtes sont séparés en deux branches ; la première, ou branche des Gaels : Ecossois, Irlandais, habitants de l'île d Manx ; la seconde, ou des Bretons (Bas-Bretons, Gallois et Cornouaillais d'Angleterre).

³⁵ Yor : notenn, e galleg, gand an oberour : Yor, Dieu suprême des Celtes, selon l'enseignement des Druides.

³⁶ Abred : notenn, e galleg, gand an oberour : Abred signifie dans l'enseigenemnt druidique, la vie actuelle.

³⁷ Annouf : notenn, e galleg, gand an oberour : Annouf ou la profondeur est l'état des âmes qui attendent de venir sur cette terre.

³⁸ Gwened : notenn, e galleg, gand an oberour : Monde blanc ou paradis.

³⁹ gwrizien : gwriziou ?

VII

Anaon, skoazell greñv Yor
(Den maro a vro Breiz-Izel,
Sidh⁴⁰ Iwerzon, koant 'vel eun Êl)
Gand da Youl en pep tu d'ar mor,
Ar yez santel bremañ 'klever !
Anaon mestr d'ar hantvejou
En peb leh hag en peb amzer
Sentuz on d'az kourhemennou !

Diwez ar c'hoari
Léon Le Berre
barz Ab. Alor

Greet en Iwerzon. Bloaz MDCCCIV

⁴⁰ Sidh : notenn, e galleg, gand an oberour : : Eur voudig gouenn en Iwerzon.. notenn, e galleg, gand an oberour : Sidh est le nom générique de la fée irlandaise.